

Imbourc'h

KELAOUENN A STUDI

Petra a c'hoarvez
e Medjugorje ?



Niverenn 180

31 Kerzu 1984

Bez ez eo an niverenn-mañ an hini diwezhañ eus ar bloavezh 1984. Anaoudek-bras . e vefemp ouzh hol lennerion mar kasfent diouzhtu o skodenn-vloaz evit 1985, war un dro gant priz ar stagadenn diwezhañ, kenkas n'o dije ket graet c'hoazh.

Gouestlet e vo an niverenn da zont da veaj KRISTENION BREIZH er broioù keltiek. Hini C'hwevrer ha Meurzh a vo gouestlet d'un danevell hir aozet gant Yann Mikael.

NOTENNOU POLITIKEL

gant

Youenn OLIER

Prosezou e Breizh

Ar prosezou nevez renet a-enep da stourmerion yaou-ank e Breizh, peurgent a-enep da bPatrick Garin ha Denez Riou o deus va lakaet da brederiañ a-nevez war gundenn ar feulster. Gouzout a reer ez eo bet gloazet grevus unan eus ar stourmerion-se o klask kas da benn ur gwall-daol a-enep da E.D.F. en Arzhon. Evit egile ne hañval ket ar c'hraf-kehuzañ bezañ nag asur na prouennus na kendrec'hus. Diogeliñ a rae an tamallad ne oa ket bet lakaet gantañ an danvez-tarzh a zo bet kavet en e garr gant ar gerreizh. N'omp ket evit skarañ ar poent-se moarvat, nemet e c'heller stadañ evelkent n'eo ket ar wech kentañ ez eo arveret ar c'hraf-kehuzañ-se - kavi-digezh (**burzhudus**) un tamm danvez-tarzh e ti pe e karr un danvez-tamallad, - e prosezou renet a-enep da ems-averion zo abaoe un dek vloaz bennak (a-enep da Yann Builhandr ha da Yann Fouere a-ziagent), pezh a dennfe da ziskouez dreist-holl n'o deus ket paotred ar gerreizh c'hall kalz a faltazi. An iskisañ eo e vez kavet aes-meurbet ar c'hraf-kehuzañ-mañ gant an dud-a-varnerezh gall, ken en em c'houlenner ha ne vefe ket koulz dezho lakaat diouzhtu da dalvezout reizh al lizhiri siellet eus ar renad gall kozh ; sklaer hag onest e vefe seurt pleustr, da vihanañ.

Nevez zo ez eus bet dalc'het e Roazhon ur vodadeg

foran evit difenn ar stourmerion euskarat a oa bet daskoret gant gouarnamant gall sokialour Mitterand d'ar gouarnamant spagnat sokialour, pe a oa bet berzet outo dont d'en em staliañ e Breizh. Un toullad stourmerion euskarat a oa en em gavet eno evit difenn ar gouvezel kaset war-raok gant stourmerion ETA milourel en Euskadi. N'em boa ket gellet mont d'ar vodadeg-se. Hogen klevet em eus hini pe hini o komz eus ar prezegennoù a oa bet distaget pe ar breutadegoù a oa bet dalc'het da geñver ar vodadeg-se. Ne rin meneg nemet eus un arguzenn ar implijet gant unan eus ar stourmerion euskarat ev- it reizhabegañ an erdro ouzh ar feulster, ouzh ar muntr, o komz fraezh, er stourm a zo renet gant an emsav-se: seurt hentennoù a zo bet heuliet gant ar **resistañserion** c'hall e-pad ar brezel diwezhañ, hag a oa evit ar re-se ur brezel-dieubiñ; int avat hag a oa ivez **resistañserion** o ren ur brezel-dieubiñ d'o zro, o doa ar gwir da heuliañ kerkoulz an hevelep hentennoù.

Eveljust n'eo ket degemeret an arguzenn-se gant ar gouarnamant gall end-eeun, hag a gemer da zigarez . ez eus bet roet un tamm emvelestrerezh da Euskadi gant ar gouarnamant sokialour spagnat. Hogen ne vefe ket tenn distreiñ an dorzh d'ar gêr, d'hor soñj. Bez' o doa ar C'hall- aoued ivez un tamm mat a emrenezh e-pad ar brezel; ur gouarnamant lezennel o doa, hini Vichi, ha sañset e oa he- mañ hini ur Stad dishual, peogwir en devoa kannadtiou e pep lec'h er bed.

Hogen daoust ha mat eo evit se an arguzenn implijet gant Euskariz ? Douetus eo n'eo ket ken mat se. Gwalldaolioù ar Resistañs gall, komunour pe get, n'o deus bet talvoudegezh vilourel ebet. Aozet int bet dreist-holl, - se a zo gwir a-berzh ar gomunourion koulz hag ar re all, - diouzh ar bennaenn a zo diouzh ar c'hiz gant ar varksourion gleizelour dreist-holl, deuet war an dachenn en hon emsavioù war-dro ar bloavezhioù seikont: tagerezh-moustrerezh-tagerezh, ar chemedenn-mañ bet

dec'heriet ha skeudennaouet, da skouer, da gentañ da geñver prosez Burgos a bourchasas da SAE unan eus he stourmadennoù-brudañ kentañ, - hag a dermene ervat kelc'h ifernel ar feulster; en ur seurt reizhiad ez a ar moustrerezh da geflusker an emsav rak degas a ra mui-ouzh-mui a dud da gemer perzh en emgann, dre ret, koulz lavaret, o vezañ maz eo dall pep moustrerezh. Ur skouer splann eus dedalvezadur ar bennaenn-se hon eus e drouklazhidigezh Heydrich e Praha e-pad ar brezel diwezhañ, ur gwalldaol bet prientet ha sevenet, - notit se, **gyda llaw**, - gant ur **"gouarnamant bourc'hiz en harlu"** e Lunden, ha n'en doa, adarre, talvoudegezh vilourel ebet, ha da amkan hepken devoudañ ur barr-moustrerezh a-enep d'ar boblañs a-berzh ar pennadurezhioù alaman, ha mirout outi a genlabourat gant ar re-se, rak - a-hervez - e oa Heydrich o vont da c'hounit grad-vat ar boblañs-se. Ha pep feur en e reizh, tost e oa an taol-sponterezh-se - a voe efedus, ret eo anzav - da unan all a voe kaset da benn e Breizh, war wall BCRA Lunden, evodadur ur **"Stad yourc'hiz"**: muntridigezh Yann-Vari Perrot, a zoujed n'en dije bet levezon war bobl vrezhoneger Kornog ar vro, gant an dezo ouzhpenn d'ober d'an emsav, diwar ar broudargad-se, entuañ gant an Alamaned, a-benn e voustrañ aesoc'h a se goude ar brezel.

Aes e vefe hiraat ar roll. Menegomp evelkent ur gwalldaol all bet kaset da benn war wall ar Strollad Komunour Gall e-pad ar brezel diwezhañ e Breizh: muntridigezh un ofisour alaman en Naoned ha n'en doa da bal nemet kleuziañ ur fozad gwad etre an alouber alaman hag ar boblañs dre zevoudañ fuzuilhadeg Kastellbrien.

Piv a zo kiriek da walenn ar feulster en Europa

Kement-se avat a verkan dreist-holl evit diskouez ne c'hell ket Euskariz, war va meno, ober dave d'ar Resist-

añs, gall pe get, evel d'ur patrom 'speredel', evit reizhabegañ o niderezh. Eveljust e komzan amañ evel ur c'hristen. Ar varksourion pe ar stadazeulerion a bep seurt, n'o deus ket da gaout an hevelep divez hag an hini a zlefe bezañ d'ar gristenion, ha n'em eus-me kentel ebet da reiñ dezho. Ur wech lavaret kement-se eo ret anzav adarre n'o deus ket brizh-arguzennoù pe wall-brezegennoù deneliezhus Fañch Mitt pe ar C'hallaoued a bep seurt kalz a ster. Ar C'hallaoued - atav e kemeran ar ger-se diouzh e eulad politikel, da lavarout eo, hini ar rumm-tud er c'hwec'hkogn a fell dezho bezañ lodek er galloud politikel gall hag en e istor, - ar C'hallaoued 'ta, a zo penngiriek da emled gwalenn ar feulster e bed ar C'hornog. Int o deus "diazezet" ar feulster en amzer o roue Charlez VII, p'o deus krouet al lu diastal; en amzer o roue, Loeiz XIV, p'en deus e vaodiern Louvois graet eus al lu-se un ardivink-brezel dizenele e servij ar gealiadurezh stadel; en amzer o Dispac'h Meur, p'o deus ensavet an hollenluerezh, ha troet ar werin da gig-kanol. Kement-se n'eo ket lavarout ne oa ket bet a-gent brezelioù kriz, ha lazhadegoù e-leizh sevenet gant bandennoù armet, e servij condottieri a bep seurt. Ar C'hallaoued avat, war un dro gant ar Saozon ha Spagniz, o deus gwashaet a-galz ar saviad dre ensavadekaatar feulster hag e lakaat e servij ar gealiadurezh stadel, a dalveze dreist-holl azeulidigezh ur Galloud politikel hag en em c'horree dreist da aotrouniezh speredel an Iliz, hag e gwirionez, dreist da bep divez ha da bep lezenn naturel, en anv **Poell ar Stad**. Ya, er c'heñver-se e c'heller asuriñ ez eo bet Gallaoued, Saozon ha Spagniz kelennerion Europiz penn-da-benn hogen, a soñj deomp, adarre, ar C'hallaoued da gentañ. Ar Stad c'hall a zo bet e deroù un hiliadur diaoulek, peogwir he deus engehetet diwarnañ ar Stadoù arnevez gwitibunan, an hini brusiad da gentañ, bet krouet gant Frederig kentañ diwar batrom ar Stad c'hall; hemañ a savas e lu diwar batrom al Lu gall penn-da-benn. A-hend-all, daoust ha yezh an alaman meur-se ne oa ket ar galleg? Daoust ha ne oa ket anezhañ ur Gall-a-enor, en ur stumm bennak?

Daoust ha ne oa ket Voltaire, pennpatrom ar Gall skouerel, mestr ha kelenner an 'alaman'-se ? Ha, na petra, ar Stad prusiat, deuet da vezañ ar Stad alaman, o c'hortoz dont da vezañ ar Stad naziat, hep kemm natur, eo a zo bet diorroourez ha kelennourez ar Stad rusian, deuet da vezañ d'he zro ar Stad soviedat, hep kemm natur adarre, eveljust! An anv hepken a zo bet cheñchet. Rak, nag ar varksouriezh nag ar sokialouriezh, na petra, ne gemmont natur ar Stad; er c'hontrol, n'o deus graet nemet peurboellelaat anezhi, he lakaat d'emouezañ da vat ouzh ar ster a zouge enni, ouzh he gwir natur. Dres, ar pezh en deus skoet va spered nevez zo, e prosez ar bolised re-c'hredus bet nevez varnet e Polonia, ez eo disklériadenn unan eus an damallidi, -aberzhet evel komunourion prosezou Moskov 1938, da uhelvad ar Strollad hag ar Stad komunour, - bourevion troet da verzherion ur wech ouzhpenn, - penaos e oa ret dezhañ difenn ar Stad (ne gomze ket an tamallad zoken eus Stad **komunour**) a-enep d'hec'h enebourion.

Nevedelezh ar Galloud diazezet dre ar feulster stadel

Eveljust e c'heller daelañ penaos ez eus bet diorreet Stadoù mac'hom hag impalaeriezhoù er-maez eus hengoun hag hiliadur an teir stad kornogat pennañ hon eus nevez veneget. Ur galloud mac'hom a oa endeo d'ar Stad rusian, a-raok ma vije digoret d'ar C'hornog. A-hend-all, e Japan koulz hag e Turkia, ez eus bet diorreet Stadoù hag a oa dezho azonoù ar Stadoù kornogeuropat diwanet diouzh hengoun an impalaeriezh roman.

Hogen, dres, pezh a zo merk-anaout ar Stadoù-se, milourelour hag impalaour, ez eo e roont bepred d'ar galloud ur seurt nevedelezh. Sellet e oa Impalaer ar Japan evel un Doue, evel Impalaer Roma ergentaou. Ober a rae ar galloud rusian anezhañ e-unan difenner an Iliz reizhkred (bet mevelekaet ha sujet strizh d'ar Stad

a-ziagent). Evit pezh a zo eus ar Stad ottoman, bez' e kave er vuzulmadegezh he reizhabegadur. Nemet e Bro-C'hall hec'h-unan e ouezer e oa bet fiziet e Hlotwig, gant lod eskibion gall-roman, ar garg a zifenner an Iliz hag ar feiz; nemet, na petra, e vad en doa graet ar Galloud eus ar gefridi-se evit astenn e graban war zouarou ec'honoc'h bepred. Moarvat o doa kavet tud-a-iliz zo aes a-walc'h hevelep gwarez, o vezañ ma chome ar renerion bolitikel kristenion dre anv, da vihanañ ; n'o doa ket merzet o doa kensakret evel-se ur patrom sevenadur politikel a ziskouezje bezañ drastus d'ar feiz kristen ha d'an Iliz a-c'houdevezh, hini ar roueelouriezh a wir doueel a roe krog d'ar galloud politikel war an Iliz.

Moarvat e c'hell lod krediñ hiziv e oa didec'hus hevelep treuzvarc'had etre **aotrouniezh speredel** ha **galloud politikel**. Prest ez eo bet atav ar re-se da ober dave da arroudennoù zo eus **LIZHIRI** sant Paol oc'h erbediñ al lealded hag ar sentidigezh ouzh ar pennadurezhioù, hep derc'hel kont eus reizhwiriegezh o beli pe get, a-benn ar fin. Hogen ne gav ket deomp e oa hevelep treuzvarc'had ha seurt emdroadur politikel didec'hus en Europa. E lod ranndirioù, en hanternoz Europa, er bed german peurgent, ez eus diwanet er grennamzer, unvezioù politikel bihan a c'hellje bezañ en em gevreet da c'houde da sevel ur Riez demokratek, nevidelour ha n'eo ket milourelour, hag a vije bet kalz gradusoc'h da viridigezh ar feiz ha berzh-mat an Iliz eget ar renadoù milourelour impalaour o deus en em harpet war diluoù ha lignezoù rouaned mac'hom evel m'eo bet Kapetiz ha Plantageniz (daou rumm Gallaoued, forzh penaos) e Bro-C'hall hag e Bro-Saoz. Andon ur seurt Europa nevidelour a c'hellje bezañ bet kêrioù hanseatek hanternoz Alamagn, pe gelc'hparzhoù Swiz, lakaomp. Eno e oa diwanet ur galloud politikel demokratek devoudel, soliadel, pleustrek, ha n'en doa ket klasket ur reizhabegadur trabedel pe gravezel en un dileuriadur bennak a-berzh an Iliz. Houmañ a oa bet ar reolenn e gwirionez, a-barzh maz adeginte ar Stad,- e-doug ar grennamzer uhel, er broioù keltiek peurgent, e-lec'h ne oa

bet savet Stad kreizennet ebet a vije bet klasket dezhañ un orin doueel bennak; a-boan ez eus bet esaet tizhout ar pal-se e Breizh hag en Alba, hogen da gentañ a-benn talañ ouzh embregadennoù impalaour ar Stadoù gall ha saoz. Hogen en degouez-se zoken n'eo ket aet biskoazh ar Stad vrezhon da glask ur reizhabegadur e mojennoù led-kraevel ar Gral, da skouer.

Abred a- walc'h avat ez eus savet bec'h etre ar galloud stadel a venne harpañ ur meni feiz kristen, sañset, hag an Iliz hec'h-unan a strive da virout hec'h emrenezh, - ken abred hag an XIIIvet kantved e Bro-Saoz (afer Thomaz Beckett), pe e Bro-C'hall (afer an Dimplourion ha Pabelezh Avignon), pe e Spagn (e ser arnod ar Jezuisted da sevel ur rouantelezh kristen e Paraguay, lakaomp). N'eo ket souezhus enta maz eur disoc'het prim war an disrog protestant en hanternoz Europa, pe drevadennadur an Iliz katolik gant ar Stad er broioù emanvet latin (un trevadennadur hag a bad dalc'hmat, forzh penaos, hini ur Stad dizoue, diwar goust un Iliz... difeiz diwar vremañ!) Dillo a-walc'h avat o deus kavet ar Stadoù gwell diorren ur gealiadurezh stadel dishual, mar galler lavarout, a zo c'hoarvezet dreist-holl da geñver krouidigezh ur c'hultur stadel a zo deuet da vezañ ar gouloc'h rentet gant ar Stad dezhi hec'h-unan. E Bro-C'hall ez eo bet boulc'het an argerzhad-se dreist-holl er XVIIvet kantved. D'ar mare-se ez eur krog a-zevri da skrivañ an Istor, Istor ar Galloud, gant ur pennlizherenn; d'ar c'houlz-se ivez e sujer al lennegourion war-eeun d'ar Galloud, evel en Impalaeriezh roman da vare Augustus. Hogen ret eo notañ koulskoude ez eo deuet an istor, ur Vojenn anvet an Istor, da vezañ pennañ elfenn ar c'hultur nevez ha da wiskañ d'ar Stad ivez un nevedelezh nevez piaouel a roio digarez d'an Uhelveleion anezhi d'aberzhiñ dezhi kantmiliadoù ha milionoù a dud. E seurt degouezh adarre, evel ma verke Roparz Hemon gwerso, ez eo an Istor ur seurt gouloc'h lidet gant ar Stad en hec'h enor hec'h-unan. War-bouez an nevedelezh-se bepred ez eo

bet dibradet an Istor d'ar barroù uhelañ, dreist-holl avat gant an hegelourion hag ar varksourion o deus graet anezhañ eztaoladur ar Peurvoud enkorfet er Stad, da lavarout eo, er galloud.

Ar feulster evel merk-anaout nevedelezh ur Galloud

Gwir eo a-hend-all ez eus bet graet eus arver ar feulster merk-anaout ar Galloud stadel, ar Veliezh stadel. Kement-se a zo stuzegezh, frouezh un istor, un istor brein, mar karit, un istor avat. Ha stourmerion an emsaviou-dieubiñ, pe varksour e vent pe get, ne c'hellont kemer o-unan a-zevri o emgann nemet war-bouez implijout ur feulster hag a dalvez, da gentañ, lakaat en arvar buhez o enebourion hag o buhez o-unan. Rak-se e oa un tammig didro respont ar Maodiern gall Badinter, da geñver digorlidadur ar Barndi nevez e Roazhon, d'an emsaverion a rae goulennou dezhañ e sigur ar brizonidi bolitikel vrezhon, e miz Genver. Soñjit, emezañ, daeroù en e vouezh, e c'hellje ar gwalldaolioù sevenet gant an dud berrboell-se bezañ gloazet pe lazhet zoken un den dinamm bennak! Emichañs e soñj deoc'h ez eo Badinter ur galon dener a zen evit ober ken damantus diskleriadenn ? N'em-aoc'h ket ganti ! Badinter, evel ar C'hallaoued - politikel - all, a gred e talv ar boan lazhadegañ dekmilionoù a dud evit saveteiñ ar Stad c'hall, mirourez ar yezh hag ar C'hultur gall, a zo unan, d'e soñj, gant ar Wirionez; rak-se a-hend-all o deus ar C'hallaoued - politikel - kalfichet armoù atomel. Gouzout a reont ne vint biken evit implijout an armoù-se, a ro poan-spered d'ar re a vefe karget, diouzh ret, d'o zanañ, e-giz m'en diskouez '**barr-izelvred**' un ofisour gall karget da bleidiñ gant ar reizh-tanañ eno nevez zo, - met ret eo da atebelion ar Stad c'hall, dre an hent-se, sankañ mat en o fenn ez eo dreistbuhez Vro-C'hall - peseurt Bro-C'hall, forzh penaos, hini Bascal pe hini Voltaire ? -un dra bouezus-dreist evit dazont an Denelezh, pezh n'eo ket anat tamm ebet koulskoude ! Ne-

met, na petra, nag ar Vrezhoned nag Euskariz n'o deus ar gwir da soñjal an dra-se diwar-benn o bro o-unan (ha padal, dre ar feulster eo e vez ganet ar broioù, evel ma tiskleir ken fraezh Charles de Gaulle e-barzh unan eus e levrioù, "dre ar c'hleze hag an tan").

Daoust hag ar feulster a c'hell servijout an emsav hiziv ?

Ur wech lavaret kement-se e rankan anzav em eus-me ar brasañ disfiz ouzh ar feulster en hon emsav pe en emsaviou-dieubiñ all en Europa.

Kompren a ran en deus gellet ar gwallnerzh reiñ un tamm brud d'an emsav diouzh ma tiskoueze e kemere ar stourmerion a-zevri ar mennad a felle dezho difenn, diouzh maz emplege o obererezh vertuzioù zo a genurzh, a galonegezh pe a sportelezh; kurioù ez eo bet e gwirionez hiniennou eus ar gwalldaolioù a zo bet sevenet abaoe 1932, pa voe **lakaet ar poultr da gomz** evit ar wech kentañ (sklaer a-walc'h n'en dije ket an taol-se kavet kement helev m'en dije an aozer anezhañ graet gant ur c'houblad kezeg hag ur gordenn vat evit kas d'an traoù **Monumant ar Vezh Vroadel!**) Sakrilaj Versailles a oa, moarvat, un taol-bruderezh mat. Hogen a-hend-all e kav din en dije gellet ha dleet an emsav dioueriñ ar pep brasañ eus ar gwalldaolioù a zo bet kaset da benn abaoe ugent vloaz bennak.

Kement-se evit meur a abeg. Da gentañ, en arbenn a zibab an tu-kleiz graet gant an emsav abaoe ar mare-se n'en em ziskouez mui an taolioù sevenet gant o aozerion evel eztaol un emskiant vroadel e Breizh, o vezañ maz aked an oberourion anezho reiñ ur ster renkadel dezho evit dedennañ grad-vat rummoù tud ha na reont foeltr ebet eus ar vroadelouriezh vrezhon a-benn ar fin, evel m'en diskouez ivez unan eus an tarzhadennoù nevez kaset da benn gant an ARB.

Ne gav ket din ez eus an disterañ tra da c'hortoz

diouzh ar gostezenn dehoù gall, ken digristen hag an hini gleiz, diouzh ma ra dave bepred da hengoun an Dispac'h gall (evel ma ra Le Pen e-unan a-hend-all). Daoust da se e ranker gouzout ez eus chomet e spered ul lodenn vat eus ar Vrezhoned ar soñj ez eo difennet gwelloc'h an talvoudoù kristen gant ar gostezenn dehoù, evel m'eo bet sklaer a-walc'h da genver: an diskeladegoù a-du gant ar skolioù prevez bloaz zo dres. Rak-se e soñjan ez eo diboell a-berzh paotred ar feulster e Breizh koulz ha d'ar stourmerion all en em renkañ en ur gostezenn ken gall hag eben, forzh penaos, ha na zerc'houez en hor bro nemet war-dro 40% eus an boblañs. Ret eo doujañ ar Vrezhoned e-giz m'emaint ha chom hep disteurel rumm ebet anezho. Se a zlefe bezañ kounet. Ha seurt reolenn a vefe aes da virout ma prizfe ar stourmerion chom bepred e par Breizh hec'h-unan, ha n'eo ket e par ar **c'hwec'hkogn**, evel ma reer o kemer perzh en duvell kleiz-dehoù gall, dreist-holl abaoe maz eo deuet UDB war an dachenn.

Lakaet zoken e vefe mennet ar c'huchennadoù tud a bled gant ar feulster-se da grouiñ ur seurt nerzh-lu dirgel ne c'hellfemp ket bezañ a-du ganto diouzh ma rafent dave da bennaennoù marksat pe led-varksat e dislavar gant ar feiz kristen. E nouspet bro ez eo bet skrapet an Dispac'h gant tuidi an tezennoù marksat. Ne gav ket din ez eus un dañjer diouzh an tu-se e Breizh, met mat eo lakaat an dud war ziwall ouzh hevelep degouezhuster.

War ar marc'had, re aes e vefe da baotred ar gerreizh c'hall pe da c'hraourion ar renadoù marksour er mare-mañ, gant an araezioù a zo en o c'herz, arverañ ha leviata ar gronnadoù spontelour a garfe ober trouz ha 'distabilaat' ar renadoù frankizour kornogat. E gwirionez n'hon eus ket gronnadoù spontelour seurt-se e Breizh er mare-mañ, ha me 'gav din n'eus ket bet biskoazh. Hogen en em c'houlenn a ran ha n'emañ ket war var da noazout ouzh an emsav a-benn ar fin, ar strollouigoù nevez dedennet gant an obererezh dirgel diwar lenn ul lizheraduar un tamm romantelour, a gav din, en-dro da luskad BREIZ ATAO, hag a zo bet aozet e galleg dreist-holl abaoe un toullad

bloavezhioù (gwir eo ez eus bet ivez un elfenn romantelour er gleizouriezh vaoat en em ziskouezet en emsav er bloavezhioù '70). Ezhomm a zo moarvat da vroudañ faltazi an danvez-stourmerion ha da dizhout ar c'hedveno. Kompren a reer ivez e vefe tentet brogarourion yaouank zo da dec'hout diouzh enkadenn nevez ha morvor an emsav - maz eo kiriek dezho dizeriadur UDB h.a. - dre en em deurel en un obererezh feuls. Hogen ret-mat eo stadañ emañ ar feulster hag ar sponterezh oc'h ober o reuz e pep lec'h, hag e teu ar sponterezh-se a-wechoù a-berzh anvelourion diskiant a zistruj mab-den dre ar meizadur o deus anezhañ end-eeun.

Erfin n'eo ket kredapl tamm ebet, ne vern penaos, e vefe tu da gas da benn en hor broioù ur "**brezel-dieubiñ**", da gentañ peogwir n'eus pobl ebet da **zieubiñ** er mare-mañ e Breizh, da adsevel, ne lavaran ket, (1) en ur implijout an araezioù a zo en hor c'herz dre ar sevenadur arnevez, en ur dennañ mad eus dizeriadur ha **disteriekadur** ar Stadoù arnevez. En Euskadi zoken koulz hag en Iwerzhon an hanternoz e hañval ar feulster bezañ enket en un hent dall (daoust d'ar sikour a c'hell stourmerion Norzh-Iwerzhon gortoz digant Iwerzhoniz ar Stadoù-Unanet).

Dreist-holl avat emañ seurt luskadoù spontelour pe damspontelour war-var, d'hor soñj, pe da vezañ leviataet diwar atiz gant gwazerezhioù ar gerreizh c'hall, lakaomp, pe da gouezhañ e dalc'h gwazerezhioù renadoù eus ar reter. Re dost eo an dañjer war an tu-se evit ma c'hellfed kemer riskl ebet o c'hoari ur brezel bihan ha na gas da neb lec'h.

Ne gav ket enta din ez eo poent d'ar stourmerion pennfollañ war zigarez e ve mallus adsevel ur 'Stad vrezhon'. Se a zeuio pa vo deuet ar c'houlz. Evit ar poent avat n'hon eus mui netra da goll peogwir e ouzomp ez eo echu gant ar rannyezhoù brezhonek, lakaomp. Gwell ha furoc'h eo kontañ war an amzer a

labour a-du ganeomp dre zistrujañ bemdez donoc'h kealiadurezh ar Stadoù arnevez, hag hini ar Stad c'hall peurgetket. Hogen n'eo ket an destenn-mañ hini an NOTENNOU a skrivomp hiziv.

Youenn Olier

§§§§§§ §§§§§§ §§§§§§

(1) Bro-C'hall n'eo ket gouest d'en em zifenn, n'eo ket peogwir e vank an armoù dezhi, met peogwir **n'eo ket da zifenn**, o vezañ ma n'eus ken a bobl c'hall, dezhi ur stuzegezh unvan. Re a ziforc'h a zo etre an amrizh kenderoù a zo daspugnet en ur Stad ha n'eus anezhi, a-benn ar fin, nemet un dastumad lazoù armerzhel. Zoken e Kaledonia Nevez ne zifenn ar C'hallaoued a zo staliet du-se nemet lazoù armerzhel. N'eo ket, sur-mat, ar feiz kristen ez int aet da skignañ hag a zifennont a-hont. Pezh na dalv ket n'eus ket da zisfiziout diouzh ar gostezenn dizalc'hour diouzh ma c'hell bezañ arveret gant graourion gomunour. Hogen se a zo ur gudenn all.

○○○○○ ○○○○○ ○○○○○

Yann MIKAEL

AN DAÑVADEZ
KLANV GANT AR C'HAL

Ar c'hiz eo bremañ gant kristenion zo kavout ez eus perzhioù-mat gant Muslimiz. Bamañ a ra kelaouennerion ar wask katolik ouzh Muslimiz o pediñ war o farlochoù. Klevet em eus ul lezvreur din ha na daol gwech ebet e droad en un iliz, o kanañ meuleudi da Durkiz a vez o labourat gantañ e mengleuzioù maen-skjent Trelaze, dre ma yunont e-pad ar Ramadan. Nevez zo, en iliz vBlaen, e voe goulennet diganeomp pediñ evit "**hor breudeur**" muslimat hag a gred eveldomp en un Doue hepken. N'eo ket avat evit ma vijent kanttroet, nann, - lennet mat hoc'h eus, pediñ hepken evit ar Vuslimiz-se, traken. E-keit-se e kouezhe kristenion Liban dindan taolioù didruez Muslimiz, mennet d'ober dezho o stal ur wech evit mat.

N'anavezan ket a-walc'h an Islam evit barn ar relijion-se. Bevet em eus avat e-pad pell a-walc'h en Aljeria hag er Sahara evit lavarout ur ger bennak a-zivout he c'hredourion. Pep hini a oar, mui pe vui, ez eo ar Ramadan, **Koraiz** Muslimiz. Un tammig disheñvel eo avat diouzh koraiz ar gristenion. Da gentañ ez eo difennet evañ, debriñ, butuniñ, kaout darempredoù etre priedoù, adal sav an heol hetek kuzh an heol. E-pad an noz avat e c'hellit ober chervad kement ha ma plij deoc'h. D'an eil, mont ha dont a ra deiziadoù ar ramadan kalz muioc'h eget re hor c'horaiz-ni. Evel-se em eus gwelet ramadanoù e dibenn an nevez-amzer ha reoù all e-kreiz ar goañv. Er Sahara, unan eus broioù tommañ an douar, ez eo diaes derc'hel d'ar reolennoù-se ken strizhe-pad an hañv. War dachennoù-korvoñ an tireoul, e-lec'h e labourer kalz Aljerianed o tont eus arvor ar mor kreizdouarek e c'horrekae kalzik a-walc'h obererezh ar chanterioù e-pad ar mizioù tommañ. Hervez ma oa tu, e veze

aotreet d'ul lodig, bras pe vrasoc'h, mont da dremen ehanoù er gêr. Ret e oa da zarn avat chom, evit d'ar chanterioù mont en-dro, koustet pe gousto. A-zivout an drase, em eus anavezet un aljerian hag a oa bet gwall-glañv e-pad ur ramadan diwezhat. Disonjet-krenn em eus e anv gwirion; kounañ a ran hepken avat e vlenie un tourter, hag e labour, d'an ampoent, e oa bountañ an '**emskraberioù**'* en ur vengleuz jips evit o skoazellañ da gargañ o samm. Gant monedone dizehan an ijinenoù, e oa beuzet ar vengleuz en un doare poultr gwenn, pezh a rae da Vokktar pasaat evel unan klañv gant an dorzhellegezh, kement e veze taget e skevent gant ar jips, daoust d'ar frilien a lakae war e zremm d'en em wareziñ. Boaz e oa da lonkañ ur c'hourlañchennad dour, goude bezañ bountet tri emskraber, hogen bannac'h ebet pa veze erru ar Ramadan. Soñjit pebezh poan en deveze. Bloaz war-lerc'h, kemmet penn d'ar vazh, echu gant ar yun. Mokhtar a zilezas e gengredennidi hag e teuas bemdeiz da zebriñ gant Europiz e-pad ar Ramadan. Setu Muslimiz brouezet ruz, ha stad er c'hontrol er gristenion, hag ar fistilh da vont en-dro e-keit-se. Un deiz m'edon o tivizout a-zivout an dra-se gant ur blenier **emskraber** a laboure gant Mokhtar war an hevelep chanter, e lavaras hemañ din: "Mar c'hoarvezfe an dra-se em c'hêriadenn, en em gavfe Mokhtar gant ur gontell plantet en e gein a-benn nemeur." Ken sebezet e voen gant hevelep diskleriadenn maz enebis groñs: "Petra 'rit eus gwir pep hini da ren e vuhez hervez e c'hoant?" Ha setu eñ da respont din gant ur mouse'hoarzh un tammig dismegañsus: "Poellata a rit evel an holl Europiz, hogen evidomp-ni, Muslimiz, ez eo disheñvel-krenn an traoù. N'hon eus ket ar gwir da ren ur vuhez hag a vefe ur skouer fall evit ar re all, hervez ar relijion." Ha setu eñ da gontañ din ur seurt parabolenn: "Lakaomp un den a vefe en e biao un tropellad deñved. Mar c'hoarvez gant unan eus an deñved bezañ klañv gant ar c'hal, petra 'soñjit e raio ar mesaer gantañ ? Lazhañ an dañvadez klañv evit mirout na vefe kontammet an tropell en e bezh." - "Hogen," emezon o taeriñ, "un den n'eo ket un dañvad ez eo; bemdeiz e vez

lazhet deñved evit magañ an dud ; lazhañ un den avat a zo ur muntr." - "Evit parraat ouzh an hevelep kleñved ez eo ret arverañ an hevelep louzeier," a glozas va c'hen-divizer.

An amzer o vont e-biou ez ankounac'hais an dra-se. Pa c'hoarvezas darvoudoù kriz Bro-Iran e soñjis en-dro er barabolennig a-zivout Mokhtar, ar blenier tourter, o nac'hañ yuniñ e-pad ar ramadan, rak an Ayatollah C'ho-meini, goude bezañ skarzhet ar Shah, a grogas da lazhañ deñved e dropell, a oa sañset bezañ klañv gant ar c'hal, hag un toullad mat a oa anezho. Ha tamm-ha-tamm e hañvalas ar bed muslimat en e bezh bezañ gounezet gant ar c'hoant-se a c'hlanidigezh, ken na reas ar brezel e reuz etre Irak hag Iran, hep kontañ brezel Liban a yae en-dro endeo abaoe bloavezhioù.

Er c'heit-se e oan-me deuet da vezañ penn-tiegezh, ha din bugale en oad da vezañ desket war draoù ar relijion. Gouzout a ouien e oa bet kemmet an traoù un tammig abaoe amzer va yaouankiz. En abeg d'an diouer a veleion e veze fiziet ar c'hatekizañ er mammoù-tiegezh. Ne rae forzh, diouzh ma oa graet mat ar c'hentelioù. Er bloaz ma ranke va mab kregiñ gant ar c'hatekiz-mañ e klevis an Aotroù person o klemm dre ma ne oa nemet maouezed o katekizañ; un nebeut gwazed, emezañ, a vije deuet mat, sur. Broudet gant ar gouviadenn-se e kinnigis va skoazell, a voe degemeret diouzhtu. Setu penaos en em gavis o katekizañ teir flac'hig war un dro gant va mab. Roet e voe din dornlevrioù, ha souezhusat tra, al levrioù-se n'o devoa ket kalz a dra da welout gant va c'hatekiz a wechall. Disheñvel e oa an hentenn, eveljust, met n'eo ket eus an dra-se e fell din komz, - eus an danvez e-unan, ne lavaran ket. Nebeut a dra a denne da Zoue, - da vuhez an dud ne lavaran ket: maerdi, Hachelemoù, marc'had, skol, c'hoarioù, sport, ha me 'oar-me, - ur gwir gatekiz **homeopatek**. Pedet d'ur vodadeg gant kerent all bugale katekizet e welis ne oan ket an hini nemetañ o klemm.

Ar maouezed a oa azezet ouzh an daol war va zro, maouezed diwar ar maez, a rae an hevelep rebechoù d'an dornlevrioù katekiz, hogen sevel a-enep da gomzoù an Aotroù Person, ne gredent ket ober, seul vui ma oa a-du gantañ an nebeut maouezed o doa digoret o beg, maouezed eus ar vourc'h, boas da gomz er bodadegoù. Unan anezho, gwreg d'ur skolaer, a rae meuleudioù d'an doare nevez d'ober gant follennoù da zistagañ ha da begañ war gaier ar bugel.

Kompren a ris buan a-walc'h un dra eeun-kenañ. Oc'h ober war-dro katekizañ ar vugale ez eus mammoù hepken, ha renet e vez ar re-mañ war-bouez o fri gant beleion a fell dezho bezañ **modern**. Ar merc'hed en em gave war va zro, stad enno o kavout ur gwaz a soñje evelto diwar-benn doareoù nevez ar c'hatekizañ, am atizas da gomz d'am zro, ha da reiñ va ali, war un dro gant o hini. "Komzit 'ta, c'hwi," emezo din, e kuzulig, "aesoc'h e vo selaouet ur gwaz eget maouezed evel domp." Ha me da ziskleriañ krenn-ha-krak pezh a zispilje deomp en doare nevez da gatekizañ. Plijet ne voe an Aotroù Person gant komzoù ken dic'hortoz, pep hini a evezhias ouzh an dra-se buan, gant an doare en devoe o troc'hañ berr ar vreuradeg; ha pa voe klozet ar vodadeg hec'h-unan ne oa ket seder an aergelc'h er sal-emvod, me 'lavar deoc'h.

Diwar neuze avat e ris va mennoz d'ober va c'hentelioù katekiz evel ma plijas din, dinec'h-kaer, e-giz ma oan-me bet katekizet gwechall, pezh a blijas e-leizh da gerent ar vugale fiziet ennon; ha bewech ma veze bodadegoù gant beleion ar barrez e kendalc'his da vurutellañ an traoù a gave din e oant iskis e-keñver ar gwir relijion. Pezh a ranke c'hoarvezout avat a c'hoarvezas: serret e voe ouzhin dor ar c'hatekiz gant an Aotroù Person. Distalet e oan bet diouzh an tropell evel pa vije bet ac'hanon an dañvad klañv.

Koulskoude ne zeuen ket a-benn da grediñ e oan-me an hini klañv, rak evidon hag evit an dud a zeuas d'am frealz-iñ, e oa an deñved klañv ar re a serre ouzh va fri dor ar c'hraou. En-dro deomp e weled an drasterezh graet gant

ar c'hleñved; e-leizh a feizidi, gredus betek-henn, a zileze ur relijion ha na hañvale mui bezañ ar relijion a-viskoazh, hep ma vije deuet war o lerc'h an dud a zleje bezañ bet dedennet, sañset, gant ar relijion giz-nevez. Hogen traoù grevusoc'h c'hoazh a oa: ar re yaouank a baoueze, a-vil-vern, a bleustrin ar relijion kerkent hag echuet ar c'hatekiz ganto. "Lanv an amgredoni o sevel an hini eo," a lavare an Aotroù Person. "Ha ret-mat eo d'ar gerent dougen bri da amgredoni o bugale," en anv ar rezid-da-grediñ.

Feiz d'am Doue, mar n'eo ket un druez klevout hevelep kofchennoù! Perak e paouez ar re yaouank a grediñ ? En abeg da skorted ar gelennadurezh kravezel an hini eo, anat a-walc'h eo, ur gelennadurezh diazezet war bennaennoù o vont war rouesaat a-feur ma vezont distalet gant an Urzhaz koulz lavaret; elese, ur gelennadurezh he deus poan da chom en he sav. Pa glever, da skouer, ez eo ar **C'henliezh** en **EMGLEV KOZH** un dastumad barzhonegoù hepken, en deus unan ar gwir d'en em c'houlenn petra eo deuet ar C'hrist d'ober war an douar : evit hor selvel eus petra, peogwir ne vez mui kont eus pec'hed orinel ebet. Pa ne vez mui komzet eus Pec'hed, nag eus Purgator, nag eus Ifern, nag eus Baradoz, perak ac'hubiñ ar vuhez gant reolennoù strizh ha dic'hizet ? Ha kement hag ober, perak krediñ en un Doue **eorizhel** ha n'en deus krouet netra, peogwir e vez diogelet gant ar ouiziaded abaoe pellzo n'eo ket AZA hag HAVA hor c'herent kentañ, hogen ez eo hon Tad kentañ ur seurt Marmouz hag hor Mamm ur seurt Marmouzez (se a vez kontet gant beleion **sklerijennet!**).

Graet eo tro ar park, ha hadet an dreog. N'en deus mui an Diaoul nemet gortoz an Eost, ha pebezh eost e vo ! Rak kas er bed yaouankizoù katekizet evel ma vez graet hiziv, koulz eo se ha kas soudarded d'ar brezel, hep tokarn na fuzuilh, pe m'o deus tokarnoù, ez int toullet evel delioù fav Koad Kêryann, ha m'o deus fuzuilhoù, ez int graet e koad eus an hevelep fav.

E-pad an amzer-se e weler Muslimiz o c'hoari an dud

c'hlan, eeun, leal, en ur hemolc'hiñ kenwallerion Satanaz a zo, en o soñj, ar bed kornogat bet kristen gwechall penn-da-benn. Ha n'eo ket diaoulek an dra-se ?

Yann MIKAEL

+++++ +++++ +++++

Kendalc'h eus ar bajenn 383

dreist-holl ar pajennoù 193 ha 194). Anv a zo c'hoazh eus 'kevredigezh ar vrezhonegerion': setu unan, da nebeutañ, ha n'en deus ket aon da ziskleriañ e soñj ha da vezañ a-du, tamm pe damm, gant mennoziad ar 'geto' brezhoneger. Danvez ur pennad all a zo aze.

Notennomp ivez pennad Christian Giraudon en niverenn 227, Du-Kerzu 1984: "Diskar-amzer ha diskar-vro".

Tepot Gwilhmod

xxxxxxxxxxxxxxxxxxxxxxxx

Herve LANNDIERN

Un diell e sell da istor
an darempredoù etre Brezhoned hag Alamaned
e-pad ar brezel diwezhañ

Da heul marv Ael Perez, d'ar 15 a viz Here 1984, en Ospital Skolveuriek München, eo bet troet goustadik ur bajenn eus hon istor maz eus savet diwar he fouez arvelloù e-leizh ha n'eus ket c'hoazh fin dezho, moarvat.

Hag eñ ganet e Roazhon d'an 22 a viz Mae 1927, eus un tiegezh o tennañ e orin eus Bubri, e rannvro-Ereg, ez eo deuet Ael Perez d'an Emsav dre hanterouriezh e c'hoarezed, kalz koshoc'h egetañ. Deuet da vezañ ezel eus S.B.B. e voe barnet evit ar wech kentañ e 1938, evit bezañ livet enskrivadurioù war vogerioù Roazhon. Harzet e vo adarre e 1939 evit bezañ kemeret perzh en un divourzhadeg armoù e Lokireg.

Krennus evit e vuhez e vo e gejadenn gant Neven an Henaff, rak un oberour a zo eus ar paotr yaouank-se, hag intret e vo e breder gant hini ar stourmer breizhat a zeuio da vezañ e rener. Emezelañ a ra d'ar c'houlz-se er gKadervenn - a droio da vezañ al Lu Brezhon. E 1943 e ra e annez e Lokmikael, e-tal Plistin, e 1943. Eno e tesav deñved, war e dro paotred yaouank eus an emsav ha na fell ket dezho sentiñ ouzh lezenn an S.T.O.*. Di e teuiio Neven an Henaff d'e gavout evit ober anezhañ e-unan e eiler pa vo krouet ar Bezen Perrot er bloaz-se. Hogen a-raok komz eus ar gammed-se graet gant Neven an Henaff d'ar mare-se ez eo dav dont en-dro war hor c'hiz evit reiñ un nebeut diskleriadurioù.

Dre hanterouriezh Von Stülpnagel m'en dije kejet gantañ, a-hervez, da geñver e veaj kentañ da vBerlin, ha m'en doa skoulmet gantañ darempredoù a vignoniezh, eo

en dije Neven an Henaff graet anaoudegezh gant izili ar metou milourel alaman, **prusiat**, mar karit, ma oa stag outañ ivez un tudoniour yaouank alaman, Gerhard von Thevenar, bet strobinnellet ivez gant boem ar sevenadur keltiek, hag a oa deuet da vezañ douget-bras d'ar Vrezhoned.

Izili ar c'hlozrumm milourel-se, serret hag unvan-meurbet kenetrezo, n'eo ket hepken en abeg d'un uhelvennad boutin dezho met ivez dre an dimezioù, a oa enebet dre natur ouzh Hitler a oa disprizet ganto, ken o doa klasket en em zizober dioutañ kerkent ha m'en doa bet da dalañ ouzh an droukverzhioù kentañ.

E sigur ar c'hejadennoù-se eo e tlee Neven an Henaff ober anaoudegezh ha skoulmañ darempredoù a geneiliez gant ar gronnad **Friedrich Hielser**. Hag eñ skrivagner ha prederour, en devoa Hielscher bodet en-dro dezhañ ur skoliad a veizourion penn-da-benn, en o zouez Gerhard von Thevenar koulz hag un toullad glevgadourion alaman, anezho holl broadelourion brusiat. Degaset e vo ar gronnad-se buan a-walc'h da zont tre er stourmerez a-enep da Hitler. Adal 1942 ez eo kaset Hielscher da Sveden, da skoulmañ divizoù gant ar Re Unanet. Evel-se eo ez eo bet Neven an Henaff arroutet kevraok bepred war an taol-strap a oa prientet a-enep da Hitler. Diwar se eo e tlee kejout gant eontr ar c'hont von Stauffenberg pa dremenas hemañ e Roazhon.

Doareet-rik e oa spered Neven an Henaff diouzh en em glevout gant Hielscher, dre berzh o zro-spered-heñvel hag o freder kravezel. E devoud, evel m'en devoa Friedrich Hielscher arnodet adsevel ar relijion gozh german ha diaz-ezet un Iliz wirion, gant hec'h arlidoù, en devoa Neven an Henaff ivez klasket adkavout ar relijion geltiek a wechall.

A-hend-all ez erbede un distro d'ar vuhez natur hag un doujañs d'an Natur end-eeun, a zeue war-eeun eus hengoun al luskad **Wandervogel** bet kresket en Alamagn goude ar brezel 1914-1918, hag o ragaroueziañ luskad **Patred ar Glasvez** a hiziv en Alamagn; ha kement-se kennebeut n'oa ket evit displejout d'an Henaff.

Dre hanterouriezh an tiegezh Perez avat eo e vo degaset an Henaff, war-dro fin ar bloaz 1943, da skoazellañ en un doare fetis unan eus izili oberiant ar rouedad Hielscher, ul livour israelat, a oa e anv Heinz Heinzheimer, a ranke klask goudor evit daou abeg, dre ma oa anezhañ ur Yuzev, hag ivez dre ma oa un ezel eus ur rouedad stourmerion a-enep d'an Nazied.

Un nozvezh e vo degaset an den-se betek Lokmikael e-barzh ur c'harr-tan du eus al Lu Alaman, blienet gant ur soudard e livrez. Eno e chomo ken na vo bet kavet dezhañ ur repu diogel en ur rann dihan lec'hiet en uhelañ solieradur ur savadur, straed **St-Placide** e Pariz. Aozet e vo dezhañ paperioù faoz, hag eñ o chom dalc'hmat e darempred gant ar re bPerez, dre hanterouriezh an Dimezell An Naer; deuet e oa da vezañ ur mignon d'an tiegezh-se ha graet en deus ur poltred livet eus ar mab yaouankañ anezhañ.

Dre hanterouriezh ar gronnad Hielscher eo e teuo Neven an Henaff da voulc'hañ kendivizoù gant an **Abwehr**, kendivizoù hag a zlee disoc'hañ war groudigezh ar Bezen Perrot, e dibenn 1943.

Un iskis a dra eo avat soñjal ez eo dre hanterouriezh ur rouedad eus ar stourmerez alaman ez eus bet skoulmet seurt darempredoù. Un iskis a dra eo soñjal ivez e rae an Henaff ar gammed krenn-se hag eñ o c'houzout adal neuze e oad o prientiñ un dispac'h e diabarzh an Trede Reich hag eñ, ouzhpenn, o virout darempredoù gant ar c'hourzhtroerion a oa o tanzen an dispac'h-se end-eeun. Hogen kenderc'hel a rae da vale war an hent m'en devoa divizet mont hag a zlee diboufañ war savidigezh un unvez-a-emgann a-enep da Vro-C'hall, dre ma venne en em lec'hiañ en un diabell-weled war hir-dermen, hep derc'hel kont eus an emlegadoù kempred. Uhelañ pal e vuhez e oa ar jestr arouezennel-se.

Ur wech ma voe c'hwitet ar gwalldaol kaset da benn

a-enep da Hitler d'an 20vet a viz Gouere 1944, e vo harzet Friedrich Hielscher ha taolet en un Drevvac'h. Dre un taol-chañs dibaot ne reas ket ar gerreizh alaman ervat he labour, ken ez eas an dielloù a savele darempredoù Hielscher gant renerion ar Bezen Perrot a-ziwar grog an enklaskerion; dre se e voe saveteet o buhez ivez emichañs da izili ar bezen a repuas en Alamagn war-lerc'h aloubidigezh Europa gant al Luoez amerikan.

Pa gouezhas an Trede Reich en e boull ha paz erruas ar Re Unanet e voe Hielscher tennet eus an Drevvac'h e-lec'h edo serret. An holl a oa o c'hortoz e vije anvet da arlevier unan eus al Länder nevez; spi en devoe da vat zoken d'ur mare da zont da vezañ Maodiern-Arlevier ar Rheinland-Westphalen, met ur wech kaset pelloc'h o enklask e kavas gwel ar Re Unanet lakaat gouarzh war an dilennadur-se; d'o soñj e oa ur broadelour alaman re daer eus Hielscher. Daoust hag ar prederour-se a-hend-all avije bet gouest da zont tre war dachenn ar stourm politikel ? N'eo ket sur tamm ebet!

Pezh a c'heller goulakaat eo ez eo en abeg d'an darempredoù brientek en devoa bepred gant ar Vrezhoned e kavas gwel lod soudarded eus ar Bezen Perrot en em staliañ e Westphalen, e-tal Münster, er gouzalc'hva saoz, kentoc'h eget en ur gouzalc'hva arall.

Herve LANNDIERN

§§§§§§ §§§§§§ §§§§§§

ANNOUG ABOSTOLEK AR PAB
WAR-LERC'H SENED ROMA
DIWAR-BENN KERRIN AR BINIJENN
(11 Kerzu 1984)

Sed amañ da heul pennarroudoù an diell-disoc'hañ bet gourbonnet gant H.T.S. ar Pab war-lerc'h Sened Roma diwar-benn Kerrin an Azkemed pe Binijenn. O vezañ ma vez kalvezel holl skridoù ar Vatikano, e vo kavet kalzik termenoù arnevez pe c'hoveliadurioù krouet war an taol dre an destenn-mañ.

Ar Binijenn

Ster ar binijenn eo ar c'hemm a c'hoarvez e kondon ar galon dre nerzh Komz Doue hag e diarsell ar Rouantel-ezh. Hogen pa lavarar pinijenn, e lavarar ivez kemmañ e vuhezgezh war un dro gant e galon; hag e seurt keñver e vez kefleuniet ar binijenn a reer gant ar frouezh a daoler da desteniekaat e bened: dont a ra ar vuhez da vezañ pinijennus, da lavarout eo, e tenn da vont dalc'h-mat war wellaat.

An Azkemed

Hanez ar silvidigezh, - hini an denelezh koulz hag hini pep den e pep amzer, - eo hanez un azkemed: Doue, an-ezhañ un Tad, oc'h azkemediñ gant bediz diwar-bouez Gwad ha Kroaz e Vab emc'hraet den, ha diwar-henn, o c'henel un tiegezhad azkemedidi.

Ar Mab Foran hag e vreur

Gant e c'hoant birvidik da ganttreiñ ha d'obten trugarez ur wech distro etre divrec'h e dad emañ ar Mab Foran o skeudenniñ an dud a vez oc'h emouezañ en o don

ouzh un droukhirnez d'un azkemod renet hep diforc'h war bep dachenn, tud anezho avat hag int start en o mennoz na vo hennezh beziadus nemet ha dont a rafe diwar un azkemod all, kent ha diazezel, an hini a gas an den adal ar pellder ma vez o vevañ betek ur vignoniezh abiezhiek gant un Doue m'emañ oc'h anzav an drugarez didermen anezhañ.

O lenn an dameg avat, e diarsell ar mab all, e weler emañ o teskrivañ saviad un teulu denel disrannet gant an emgerc'hioù; emañ o teurel sklerijenn war an diaes ma vez bastañ d'ar c'hoant ha d'an hiraezh da vont d'ober un hevelep tiegezh azkemodet hag unvan; degas a ra neuze da goun ar ret ma vez kemmñ ar c'halonoù en o don evit adkavout an Tad hag e drugarez ha dont da drec'hif war ankefredusted hag enebiezh etre breudeur.

Ar Pec'hed

Diskarzhidigezh Doue, torridigezh gant Doue, disentidigezh ouzh Doue, setu petra eo bet ha petra vo ar pec'hed war hed an istorvezh denel dindan stummoù lies, barrek da vont betek nac'hidigezh Doue hag e vezoud: anadenn an andouedegezh an hini eo. Disentidigezh an den o tremen, dre berzh ur gread diwar e rezid, hep anzav mestroni Doue war e vuhez, da vihanañ d'ar mare resis ma vez o terrif e Lezenn.

Ar rezid

Rez eo an hiniden. Hag arabat e vefe dianaout seurt gwirionezenn war-bouez ardeurel pec'hed an hiniadoù war beziadoù diavaezel, evel an emframmoù, ar reizhiadoù pe an hentez. Bez' e vefe se dianzav dreist-holl briegezh ha rezid an hiniden, goude ma vezont adkavet, - zoken e doare nac'hel ha reuzeudik, - betek er gretegezh da gefleuniñ ar pec'hed. Setu perak n'eus tra, e par kement den a zo, na vije ken hiniennel ha ken ankehentadus ha dellid ar briwerc'h pe gretegezh ur fazi.

Heuliad hevelep stroñs divezel a denn bepred da vougañ kement keal ar pec'hed ma teuer ha n'ouzer mui, pe dost, piv a bec'h, petra bennak ma ne c'heller ket koulskoude lavarout n'eus ken a bec'hed.

Ar c'haoued da stummañ

Paskourion an Iliz emeur o c'hortoz diganto, evel maz eo bet ar Sened ouzh henn degounañ, ma tegasfent ur c'ha-tekizadur diwar-benn ar c'haoued hag ar stummadur da reiñ dezhañ. Houmañ zo c'hoazh un dodenn, bras an erouezelezh anezhi, rak, dre berzh brizhlammoù hon stuzegezh d'ar mare-mañ, e vez argadet, enkadennet, strafuilhet ha tefvalijennet ar seurt nevedenn diabarzh d'an den, sev ar seurt me kondonelañ d'an den maz eo e gaoued.

Begozh war Gerrin ar C'hofez

Kalz begozhioù a vez o plavañ war Gerrin ar C'hofez: diouzh un tu e kaver koc'hennidigezh ar c'haoued divezel ha krevezel, koazhidigezh skiant ar pec'hed, distummidigezh keal an azrec'h, distervez an erlusk davit ur vuhez kristen diles; diouzh an eil tu emañ ar mennoz strewet amañ hag a-hont o reiñ da grediñ e c'hallfed kaout e vazaviant ent dihanterat digant Doue, zoken en un doare boutin, hep ma rankjed tostaat ouzh kerrin an Azkemod; ouzh-penn ma kaver ivez sodell ar pleustrevezh kerrinel, hep a-wechoù nep birvidigezh nag emdarzhegezh speredel o vont gantañ, seurt sodell o vezañ, marteze, da lakaat war gont ur meizadur, - faziiek ha gwariet ar gwir ster anezhañ, - diwar-benn lenadoù ar c'herrin.

Ar beleg har ar C'hrist

E-giz ma ra ouzh an aoter pa vez o lidañ ar Gevradiezh hag e-giz ma ra ivez evit pep kerrin all, e vez ar beleg o werediñ 'in persona Christi',⁽¹⁾ evel gweinour ar Binijenn. Erouesaet gant ar beleg, ma vez drezañ o kefleuniñ Kev-

rin daspren ar pec'hedoù, emañ ar C'hrist o peuranadiñ evel breur an den, evel pennveleg trugarezus, feal ha tosturiek, evel paskour dalc'hmat war glask an dañvad kollet, evel ur mezeg o pareañ hag o kennerzhañ, evel an aotroù nemetañ o kelenn ar wirionez hag o tiskouez hentoù Doue, evel ar barnour war ar vevidi hag ar varvidi, o skarat hervez ar wirionez, naren hervez an diavaezioù.

Diaesañ ha skoempañ hini, skuizhusañ ha mac'homañ hini a zo evit ar beleg eo, hep mar ebet, seurt gweinerezh, petra bennak maz eo unan eus ar re gaerañ ha frealzusañ a zo ivez.

Perzhioù ar c'hofezour

Evit seveniñ seurt gweinerezh gant berzh e rank pep kofezour kaout perzhioù denel e-giz: arboellegezh, rinidigezh, deznaderezh, groñsded amenet gant kuñved ha madelezh. Ret e vez dezhañ kaout ivez stummadurezh pervezh, naren darnel, da lavarout eo, unan glok ha kempoell e par amrizh gennadoù an douevoniezh, war dachenn ar gelenouriezh hag ar vredoniezh, war hentennoniezh an daeladurezh, ha dreist-holl war un anaoudegezh don ha kehentus eus Lavar Doue. Hogen, retoc'h eo dezhañ c'hoazh bezañ trelusket gant ur vuhez speredel kreñv ha gwirion.

Dezhañ da gas e nesañ war hent ar geveswelled kristen, e tle Gweinour ar Binijenn mont da gentañ gant an hevelep hent ha diskouez, - diwar-bouez oberoù muiget diwar-bouez prezegennoù fonnus, - e vez o ren ur vuhez yolezek diles, o pleustriñ ar briwerc'hioù avielek douedaveel ha divezel, o vogañ sentidigezh wirion ouzh mennantez Doue, karantez ouzh an Iliz hag entuoni d'an Azhraviezh.

Holl ar seurt perzhioù denel, holl ar seurt briwerc'hioù kristen, holl ar seurt barregezhioù paskourel, n'eo ket diwar bringas na kuit a strivañ e teuer d'o frenañ.

Troidigezh gant Jil EWAN

+++++ +++++ +++++

KEMENNADENN

Da Lun Fask 8 a viz Ebrel, evel bep bloaz, e vo lidet e Skrignag, eñvor an Aotroù Yann-Vari Perrot, ur brogarour dispar hag ur skouer buhezek en hor stourm evit Breizh hag ar brezhoneg.

Kregiñ a raio an devezh da 11 eur gant ul lid broadel er GROAZ-RUZ, war al lec'h end-eeun ma voe drouklazhet diazezer ar BLEUN-BRUG d'ar mintin 12vet a viz Kerzu 1943. Da bemzek eur, e chapel Koad-Kev, e vo lidet un of-erenn vrezhonek.

Dlead pep brogarour eo dont da reiñ e desteni a fealded d'ho re varv ha d'ar spered broadel brezhon, ha n'hell ket hor bro dreistvevañ heptañ. D'ar re yaouank da heuliañ roudoù o araogerion.

Ur pred a-gevret a vo servijet da greisteiz. Ar re o deus c'hoant kemer perzh ennañ a zo pedet da reiñ o anv ar bu-anañ ar gwellañ d'an Teñzorer :

**Christian RISPAL, 36 straed Kerfichant, 56 100 An Ori-
ant**

**** **** **** ****

KENSKRIVEREZH

A-berzh ur beleg eus Treger

"Aozidigezh ul levr-ofereñ. Poent eo, a gav din, sevel ul labour sirius: gant se em eus troet penn-da-benn al levr-ofereñ nevez (hini Paol VI), en ur zerc'hel kont eus ar pezh a dalv al latin implijet gantañ, ha n'eo ket unan aes bepred. Setu m'hon eus bet dija hini Kemper (ur pennad 'zo) o treiñ ijinadennoù ar C'hallaoued, hep derc'hel kont eus hengoun al latin e-keñver yezh ha spe-redegezh. Bet hon eus c'hoazh labour Klerg, graet prim-ha-prim, e sell eus ar bobl, da lavarout eo, o raba-tañ kement a zo un tammig uhel ha diaes; met siwazh, al liderezh n'eo ket atav un dra eeun da gompren. Setu perak em eus kredet ober, me ivez, va zroidigezh, hag implijout a ran anezhi amañ... abaoe tri bloaz. Dalc'het em eus kont eus hengoun al latin (lusk ar frazenn, cursus e latin), eus ster gwirion an testennoù, eus an diskleriañ a vouezh uhel...

Ouzhpenn-se, war dachenn al liderezh, em eus ivez aozet penn-da-benn war destennoù an ofereñ, ar c'han gregorian, evel m'emañ war al latin. Aozet em eus ivez ur C'hiriale gant ar c'han gregorian.

Kement-mañ am laka da gomz diwar-benn ar c'hantikou e brezhoneg. Diskouezet em boa an hent gant testennoù an Ofereñ hag ar pezh en devoa embannet an Aotrou Kalvez, meulganou ha komplidoù e brezhoneg. N'em eus ket kemmet va soñj. Hentoù faos a zo a dleomp en em ziwall diouto, dre maz int ur c'holl amzer: 1) koll amzer o treiñ kantikou gallek; abaoe ar seitekvet kantved emañ ar Vretoned gant ar stultenn-se; netra, pe dost, eus ar pezh a zo bet savet evel-se, n'eo chomet pe a vefe implijus c'hoazh. Met kement a oa bet troet diwar al latin, pe savet diwar

skouer al latin, a zalc'h da vezañ mat. 2) Sevel traoù nevez diwar skouer ar gallegachoù a-vremañ evel m'eo deus graet brezhonegerion 'zo, - rak mont a reomp gant hent ar pompadus; kement-se a blij aes, met a dremen ken buan all, dre n'eus ket donder ennañ. Ar pezh a dleomp ober da gentañ eo, moarvat, sevel traoù bihan, - da skouer, antifonennoù berr da vont gant ar salmoù: tonioù salmoù relijius; dre forzh klask e vefe dizoloet hiniennou da chom. An antifonennoù-se a c'hellfe bezañ tost d'ar re latin, pe bezañ disheñvel a-walc'h; n'eus forzh, gant ma vefent kaer, ha stummet mat, relijius ha don.

Lavaromp ivez kement-mañ: an holl antifonennoù eus ar Brevial latin am eus lakaet komzoù brezhonek warno: klotañ aes a reont.

Bremañ em eus troet e brezhoneg holl himnoù an ofis nevez, pe da vihanañ, merket evit an ofis himnoù savet dija e brezhoneg en un doare talvoudus ha kaer. ... ne vankfe evit ur Brevial brezhoneg nemet troidigezh an Aotrou Klerg evit al lennadurioù... Kenlabouret em eus d'al labour-se gant Klerg evit testennoù zo diwar ar gresianeg.

Ouzhpenn-se e venegan em eus amañ troidigezh eus an holl bennadoù eus ar Ritual ha n'int ket bet embannet c'hoazh, evel Ritual ar re glañv, Ritual ar Gouzoumenn.

Evit brezhonegerion ordinal pe emsaverion, a skrivit en ho follenn. D'am soñj, n'eus ket da ziforc'hañ: tu a zo da sevel testennoù a vefe mat war un dro evit an eil re hag ar re all, testennoù uhel a-walc'h, met hep re a c'herioù digustum; unan bennak n'eo ket un diaezamant; ar c'hantikou eus an naontekvet kantved o deus alies a-walc'h gerioù ha troioù-lavar digustum; degemeret int bet evelkent.

Mont a ran bremañ war un danvez all: labour Kollo en niverenn 177 IMBOURC'H. ... Eveljust em eus lennet Carmignac, a zo sirius-kenañ, Tresmontant, a zo skañvoc'h, met talvoudus ivez dre vras; ha reoù all c'hoazh, hag ivez, eveljust, levr enebet Grelot, a zo an hini en deus savet ev-

destenn-se hep en em c'houlenn perak he deus santez Tereza diogelet ken alies, eus an deroù betek an diwezh "pegen trugarezus eo an Aotrou."

Martez, - ur goulakadur n'eo ken, e oa evit "adreizhañ" ur mennoz a-dreuz hag a oa boutin ha digalonekaus: hini un Doue barner didruez a gasfe d'an Ifern an holl dud, nemet an nebeut re greñv a-walc'h-se a oa gouest da sevel labourioù tenn, kalz dreist tizh ar re all, hag a oa ar sent o anv. An Ifern, evel pal diwezhañ an Denelezh, ha Doue e bourvezer ! Perak eo bet degemeret, daoust d'ar gelennadurezh kristen, ar skeudenn-se kentoc'h eget hini un Doue trugarezus? Amañ ez eus ur gudenn.

Santez Tereza a gomz eus Doue gant gerioù denel ar garantez, pezh a zo reizh. Tost-tre e oa, a gav din, d'ur Breizhad, koulz lavarout, kenoad ganti: Y.B. Kalloc'h, en e varzhoneg vrudet: **Tri neved, teir bedenn.**

Skeiñ a ra skrid santez Tereza ouzh ur mennoz a-dreuz all, ken boutin hag an hini kent: Eil Person an Dreinded komprenet netra nemet evel Doue, ha tamm ebet evel un den.

Petra he dije graet santez Tereza, ma vije bet ganet e 1950, ha ma ne vije ket aet da leanez, eveljust ? Daoust ha n'eo ket **Da lestr eo da vuhez** istor ur verdeadenn, tenn ha krin a-wechadoù, etrezek ur **C'hastell diabarzh** ? N'he dije ket gellet - hag an dra-se a zo splann en he zestenn - teurel pled gant kement a aked ouzh merdeadenn-diabarzh pep unan eus an neveziadeged a vije bet fiziet enni, ma n'he dije "**amodet**" ar verdeadenn-se (pe bet amodet ganti, pezh a zo heñvel) enni hec'h-unan.

Alese, ma vevfe santez Tereza en hon amzer, e vefe santez he fetalennoù roz ur vredenvegeez; ha c'hoant am eus da skrivañ: ur vredenvegeez e chom."

G.B.

A-berzh ur beleg eus an emsav

Yaou 27 a viz Genver 1983

"Peogwir ne c'hellan ket mont er-maez em eus digoret **Imbourc'h** en-dro. Un digarez brav eo din eta da adlenn an **Notennoù Politikel**, dreist-holl ar pezh a zo bet embannet abaoe an niverenn 127-128, e miz Gouere 1980. Ac'hanta, tamm-ha-tamm e teu war wel ur gelennadurezh nevez o klotañ ouzh emgav ar vro hag ar feiz. E gwirionez ez eo dall ar Gristenion o'n em deurel dibreder e stourmoù ha n'int ket bet prientet ganto ha n'int renet ganto e nep doare. Ur bern skouerioù all a c'hellfen-me reiñ.

Degemerout a ran bep bloaz bremañ ur rentañ-kont eus ur "**Maison Familiale Rurale d'Education et d'Orientation**", eus Montroulez. Ar re-mañ avat a zo kristenion eus Bro-Leon, met ger ebet diwar-benn ar feiz pe ur stummadur relijiel bennak en o faperioù. Moarvat e vez stummet ar gristenion yaouank du-hont dre guzh, evel er broioù soviedel. Ger ebet kernebeut diwar-benn Breizh hag ar brezhoneg. Gwechall e komzed eus abafted veizel tud zo. Amañ avat hon eus da dalañ ouzh abafted veizel ar gristenion dre vras. Poent eo eta dic'hwezhañ c'hwezhigelloù zo, pa ne vefe nemet emfiziañs diboell tud zo enno o-unan, hag int dizesk a-grenn diwar-benn istor an dud, ar c'hevredadoù pe ar yezhoù.

Aet eo ivez da anaon, an deizioù-mañ, un eskob anvet Faovel, bet pell a-walc'h eskob e Kemper. Lavarout a ra deomp ar gazetenn **Ouest-France** e kemeras an eskob-mañ, Doue d'e bardono, kalz preder gant kudennoù an dud, ha penaos "**e tamalle breskted an emzalc'hoù hengounel.**" Me 'garfe gouzout gant kudennoù peseurt tud en deus kemeret hemañ kement-se a breder, rak sur-mat ne oa ket gant kudennoù ar vrezhonegerion. Moarvat e oa tizhet ivez ar brezhoneg gant "**breskted an emzalc'hoù hengounel**", rak biskoazh ne deurvezas an den meurdeus e oa an Aotrou Andreu Faovel plediñ gant yezh e gristenion, tud paour ha disprijet peurliesañ. Eskibion zo a zo graet evit kefridioù uheloc'h : kemer preder gant kudennoù an

dud.

Nebeut amzer a-raok eo ivez aet da anaon un eskob all am eus anavezet mat. Mignoned e oamp, zoken m'hor boa bet tu da rendaeliñ gant savboentoù disheñvel. Perak en doa an Aotrouñ Frañsez Kerveadou roet e zilez eus e garg a eskob e 1976 ? Respontet en doa ur wech bennak, eñ e-unan, d'an Aotrouñ Per Bourdelles : "Ne ouien ken petra ober!" Ha setu an dalc'h.

An eskob ne ouie ken petra ober evit mirout ar feiz en e eskopti, pe gentoc'h, en e eskoptioù, rak daou eskopti en doa war e choug : eskopti Sant-Brieg hag eskopti Landreger, hemañ bet diskaret da vare an Dispac'h gall. A orin kouerel e oa an eskob-mañ, graet gantañ studioù a-zoare en ur reizhiad aet bremañ da get. Pa oa pep tra o vont gant an dour en eskopti Sant-Brieg, ne gave an eskob kevredigezh start ebet evit e harpañ, nag ur vourc'hizelezh kristen ha n'eus ket bet anezhi e Breizh, nag un noblañs diberc'hennet abaoe pell amzer, nag ur renkad fetis a gouerion emskiantek eus o feiz hag o sevenadur, peogwir e renkad-eñ h'e deus bet nag emskiant na stummadur start ebet. Bet eo enta ur merour mat ha n'en doa ken hogos netra da verat, met tamm ebet un dispac'her evit ar gristenion.

Renerez ur skol brevez sañset katolik a zle dont d'am gwelout warc'hoazh evit ma sinfen ur mennad a-du gant frankiz ar skoliata, a-enep d'ar pezh emañ an deskadurezh Vroadel a anavezomp o prientiñ emichañs. Hogen an itron renerez-mañ hag a zo o chom er bourk-mañ n'he deus ket c'hoazh lakaet he zreid en iliz amañ. Moarvat ez a d'an oferenn pell diouzh ar rannvro-mañ. Ur gelennerez all eus he skol a zo o chom e T. : hevelep emzalc'h e-keñver an iliz. Hag un tiegezh kelennerion eus an hevelep skol gristen a zo c'hoazh annezet e T. Emichañs eo re goustus priz ar plasoù en iliz T. rak n'em eus ket o gwelet c'hoazh war-dro: evit gwir n'eus nemet daou vloaz zo abaoe m'emaint o chom aze. N'ouzon ket re petra a vez kelennet diwar-benn ar relijion er skol-se, met n'eus ket bet ezhomm eus va

skoazell. Al latin, eveljust, ne vez ket kelennet, daoust ma vez graet e skol ar Stad. A-hend-all ne gelenner ket en ur skol ken 'disteñget' nag istor Breizh nag ar brezhoneg. Mallusoc'h e oa goprañ kelennerion war ar germaneg. Boched ar vro a c'hortoza ur wech ouzhpenn. Met ar renerez-skol a c'hortoza va evezhiadennoù hag a lenno anezho diouzh ret gant amzer hag aked, ma fell dezhi kaout va sinadur..."

G.D.

~~~~~

A-berzh Ivon Morvan,  
e sigur amzer an Dispac'h Gall e Breizh

"An armeoù vandeat a oa bet trec'het e Saveneg hag er Mañs. E-pad brezelioù ar chouanterezh e voe lazhet etre pemp-kant mil ha c'hwec'h-kant mil den, re wenn koulz ha re c'hlas. Darn a lavar : nav-c'hant mil. Tiegezhioù a-bezh a oa bet distrujet. Renée Bordereau, anezhi ur soudardez e marc'hegiezh Stofflet, a welas daou-ugent den eus he familh o vervel; dirak he daoulagad e voe drailhet he zad.  
'Distrujit ar Vande hag evel-se e saveteot ar Vammvro!',  
eme vBarère.

Bertrand Barère de Vieuxac a oa eus an noblañs. Isañ a ra war Vro-Vande daouzek lubann\* ifernel Turreau, e miz Genver 1794. C'hwec'h lubann a dangwallerion a gerzh da gej an eil ouzh egile. Preizhañ, lazhañ ha devañ a reont kement a gavont war o hent. C'hwec'h kant kêr ha kêriadenn, miliadoù a atantoù a zo kaset da rez an douar ganto. N'oa ket a blakennoù-entanañ ganto c'hoazh: an araokaat n'oa ket aet betek aze. Hogen plantet e veze an tan er mereurioù war-bouez tennañ war ar bemiou-plouz. Ha c'hoazh, dont a rae ar soudarded en-dro war o c'hiz da beurzeviñ an dismantrou. Plantañ a reont an tan er milinoù-avel. Distrujañ a reont ar formoù da boazhañ bara. An arboelladoù gloan ha gwinizh, bigi ar besketaerion, kement tra a zo a

vez devet. Kas a reont ganto tropelladoù divent a anevaled. Ar baotred, ar merc'hed hag ar vugale a vez serret e-barzh an ilizoù da vezañ fuzuilhet. Goude-se e tangwallont an ilizoù evit na dec'ho den ebet. Soudarded ar Republik gall a zastum merc'hed ; ha goude bezañ o gwallet e \*peuldrebarzhont anezho. O flijadur vras eo troc'hañ bizied al leanezed, diframmañ an teodoù, freuzañ an daoulagadoù, troc'hañ an divskouarnoù. Kaset e vez da ospitalioù an Naoned barikennadoù leun a vehin merc'hed. Gant Turreau e vez anvet pep tangwall **'La grande illumination'**. Ar c'hêrioù hag ar bilajenoù a-du gant ar galloud nevez a vez distrujet kenkoulz hag ar reoù all. **'N'eus netra vat er Vande,'** en deus divizet ar Guzuliadeg. Ar Vandeiz republikan chomet bev a vez dezouget da Añje, Turgn, Poatie. Berzet eo outo mont da vezañ da Bariz pe war an aodoù. Evel-se e voe harluet 40.000 den. Fontenay-le-Comte deuet da vezañ republikan dindan an anv **'Fontenay-le-Peuple'** a zo kastizet: diskennet eo eus he renk a Brefeddi, hag ar gêr nevez La Roche-sur-Yon a zo lakaet da gêrbenn, dezhi da gefridi evashaat ar maezioù.

Chom a ray La Roche-sur-Yon Prefeddi pa vo adsavet ar roueelezh e Bro-C'hall zoken. Evit pezh a zo eus ar 'glevgadour' Turreau, graet e voe ur baron anezhañ en amzer Napoleon, ha graet ur **Marc'heg-a-Sant-Loeiz (!!!)** anezhañ gant ar Roue Loeiz XVIIIvet. Labouret mat en doa evit ar Vro."

I.M.

&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&&

Marteze e vefe mat ouzhpennañ un notenn bennak d'al lizher-mañ. Da gentañ, evit ar re a garfe bezañ titouret war ar ouennlzh sevenet gant Lu ar Republik Gall kentañ er Vande e c'hallfed menegiñ ur romant nevez embannet e-lec'h ez eus bet arveret a bep seurt fedoù

gwirion eus ar prantad istorel-se, hag a zo o paouez dont er-maez. N'em eus ken sofj eus an talbenn hogen anv a zo bet anezhañ er mizioù tremen er yoc'hstlenn. Ur sorbienn all a c'hellfen marteze atodiñ amañ, kontet gant va mignon Y.V. Bouëssel du Bourg: afer ur givijerezh kroc'hen-den staliet gant andispac'herion c'hall tu bennak etre Laval hag ar Mañs, un afer hag a dennfe da ziskouez n'o deus an Nazied ijinet netra. Gwir eo e raent dave a-walc'h da batrom **skouerel** an Dispac'h gall !

Heñvel a-walc'h eo ar ouennlzh sevenet gant Lu gall ar Republik kentañ ouzh an hini a zo bet kaset da benn gant ar gomunourion e Kamputchea, diwar an hevelep pennaenn: Doue a zo ar Galloud; an Den a zo Doue.

Daoust ma oa diaoulek seurt gouennlzh evel kement gouennlzh a zo, ret eo anzav da gentañ, n'eo ket hepken mennozioù an Dispac'h gall a oa kiriek dezhañ; a-benn ar fin, ne rae Rousseau nemet erlec'hiañ un dudenn difetis, ar Bobl, ouzh ar Roue, met en ur virout d'an dudenn-se ur galloud ken diharz all; kiriek 'e oa kentoc'h, pennvon nevedelezh ar galloud politikel e-unan hag ar Stad dre vras, a oa bet diogelet ha diazezet meur a gant vloaz a-gent.

D'an eil, ne oa ket al lazhadegoù-mañ nag ar re gentañ nag ar re nemeto sevenet gant al lu gall. Hep komz eus brezel Richelieu a-enep d'ar Brotestanted er rannbarzh-se end-eeun - seziz La Rochelle, kounit - e ranker, adarre, ober anv eus al lazhadegoù sevenet gant armeoù Loeiz XIV er Frankkontelezh, er Palazinad, en Izelvroioù (hep kontañ, war a lavarer, ar 25.000 kouer krouget pe doullgofet e Breizh e 1675, met, gwir eo, kourion ne gontont ket, na dindan ar rouaned, na dindan ar gomunourion). Un hengoun kozh e oa dija lazhadegoù Vande enta.

Rak ar memes lu eo en deus graet e reuz bepred; n'eus ket bet 10% eus frammoù al Lu gall o tivroañ da vare darvoudoù an Dispac'h; hag un noblañs eo a oa e penn ar c'horflu a zo bet laosket evel ur vandennad chas kounnaret war zouar Vande e 1794.





a-benn da gavadenniñ piv oa. Hir voe 'n imbourc'h. 'Benn ar fin e voe trañset gant e vreizhegezh: traoù zo en doa skrivet a ziskoueze anat ez oa ar paotr ur mailh war hagografiezh Vreizh... Buan ez aezh an traoù neuze, ha tapet kelenner kloerdi Roazon gant Kardinal Charost... mes hemañ en lakaas hepken da zilezel e gentelioù hep e gondaoniñ. E heulier, an arc'heskob Mignen, a lakaas ar gwallvrud da darzhañ (evit se, a leverer, ne voe morse anvet da gardinal...)

Eskumunuget, **vitandus** e voe ar paour-kaezh Turmel, a embannas diwar neuze e oberoù dan e anv. Evel m'en leverez e kendalc'has da zouen e soutanenn, "evit kuzhat e davantagezh", eme vMarchal, rak paour-razh oa, o vout profet e holl vadoù da gloerdi Roazon, ha ne dreuzveve nemet diwar aluzennoù ar frankveizourion. Monet a reas da anaon e 1941, mar 'm eus soñj mat. Gant ar brasañ dudi 'm eus lennet lod 'e levroù, **Istor an dogmennoù**, hag e zevarnerezhioù neveztestamantek pergen; dizanet int bremañ moarvat evit meur a dra ha ne gav ket din e rafent an disterañ "droug" ouzh nep kristen o lennfe rak... pet kristen zo a ve dedennet gant istor kent an Iliz? Evel m'en skrive Frossard n'eus ket pell: sur omp ez eus tri pe bevar eskob e Frañs a gred en Aotroù Doue; ar pezh a zo kasaus eo n'oar ket evit gouzout pere int...

Dedennet-tre on bet ivez gant da bennad a-zivout Klerg. A-du on ganit : lies hini hag a lenne BARR-HEOL (me 'n o zouez e-pad pell) en grae evit he yezh ha neket he c'hravez. Mantret oan bet pa voe "eskumunuget" gant SADED, mes gwir eo ne oa ket evit sentiñ ouzh ar reolennoù strizh a oa bet degemeret. Ken keuziet all voen pa rankjout kuitaat ESB, mes me ma-unan ne 'm boa darempred ebet gant ar strollad-se..."

G.P.

(1) Rafig Tuloup, unan eus izili ar gronnad roazhonat broadelour a ziazezas **Breiz Atao**, am eus anavezet e Roazhon e-pad ar brezel. Tro am eus bet da gejout gantañ ivez e Roazhon bepred, paz on distroet d'ar gêr-se da labourat, p'edon o chom straed Blaise-Pascal en ur ranndi HLM am boa tizhet kaout a-drugarez da bPer Roy; eno em eus bevet etre 1957 ha 1959. Dont a rae Rafig d'hor gweladenniñ bep an amzer. Ur marvailher ha nad ae e awen nepred da hesk e oa anezhañ; kalz a vousfent a oa dezhañ ha plijet e vezen bepred o selaou anezhañ. Ur seurt enepkloerelour e oa, dizrouk avat. Gantañ em eus klevet meur a goñchenn diwar-benn an abad Turmel. Bourrañ a rae Rafig e gwirionez o tezrevell sorbiennoù o tennañ d'an eskopti, d'an arc'heskob ha d'ar re a oa war e dro, a oa anavezet gantañ, war a hañvale, e-giz pa vijent bet tud eus e diegezh. Neuze e vandrouilhe gant e javedoù e-giz pa vije bet o saouriñ ur predad lipous; se 'oa michañs debriñ kig-beleg. Met, ev-el m'em eus lavaret, ne oa ket drouk tamm ebet e enepkloerelouriezh, - un tamm kenwallus, kentoc'h, e oa.

Emañ en em dennet an arzour-se, abaoe un toullad bloavezhioù, e rannvro an Naoned. Gouzout a reer ez eo bet savet gantañ an delwenn - postek - eus Nevenoe en em gav e Baen-Ballon.

(2) Marchal n'am eus ket anavezet, nemet em eus e verzet ur wech bennak e-pad ar brezel, a gav din; kejet em eus avat, un nebeut bloavezhioù zo, gant e verc'h vihan a oa o tont eus Swiz e-lec'h edo o vevañ, ma n'on ket faziet. Ur c'hefredour a oa eus Marchal, unan eus izili pouezusañ gronnad roazhonat **Breiz Atao**, ha c'hoariet en deus ur roll pouezus e deroù an eil emsav. Hogen estreget bezañ enepkloerelour e oa ivez enepkatolik, moarvat, en un doare tarter a-walc'h. Dindan levezon Maurras edo a-hend-all, evel maz eo bet meur a gefredour eus an emsav a-raok ha goude ar brezel kentañ, Y.B. Kallo'h, da skouer.

Unan eus kraonellad kentañ **Breiz Atao** hag a oa bet dindan levezon Maurras ez eo bet ivez an Tad Berto, pa oa studier e Roazhon, a-raok dezhañ mont da veleg en eskopti Gwened, diwezhatoc'h. Hemañ avat a guitaas an emsav



### A-DREUZ AR C'HELAOUENNOU

gant

Tepot Gwilhmod

#### Kannadig KRISTENION ROAZHON

Abaoe daou vloaz bremañ e teu er-maez ingal bep si-zhun ur c'hannadig evit brudañ an oferenn nemeti a vez lidet bep sul e brezhoneg e Breizh: hini Roazhon. Pal ar c'hannadig-se a zo reiñ d'e lennerion danvez preder diazezet war an Aviel ha lennadennoù ar Sul. Klasket e vez ivez displegañ munudoù 'zo eus an Istor o tennañ d'ar Bibl ha d'an Iliz. Boued-spered a vez kavet e-barzh ar follennig-se enta. Tu a vefe marteze gwellaat stumm ar c'hannadig en ur virout ul lec'h evit keleier an Emsav roazhonat, da heul al lennadennoù, hag ivez kinnig neb-utoc'h a destennoù hag addisplegoù, e doare ma teufear c'hannadig da vezañ sklaeroc'h ha neuze, aesoc'h da lenn ivez. Evit netra e vez kaset ar c'hannadig d'ar re a fell dezho (skrivañ...) Klask a ra ivez kelaouiñ brezhonegerion Roazhon war dalvoudegezh an Oferenn hag ar relijion dre-vras. Tu a vefe da aozañ ar c'hannadig evit Breizh a-bezh, nemet e vank tud a-youl-vat evit kenlabourat.

Penaos e vev ar c'hannadig ? Diwar ul lodenn eus kest an oferenn ha diwar brokusted ar brofourion a gas timbroù pe arc'hant. Maz oc'h dedennet gant degemer ar c'hannadig, skrivit da "**An oferenn e brezhoneg**", c/o Paol Kalvez, Lezhinog, 35 380, PEMPONT, **Plelan-Vras**.

EEEEEEEEEEEEEEEE

#### AL LANV

Mont a ra ar gelaouenn-se bepred war-raok, daoust d'an diouer a goumananterion, pezh n'eo ket souezhus e-

vit ul lodenn, dre maz eo e brezhoneg penn-da-benn, forzh penaos. Daoust da se e vez kavet eno peurluviañ pennadoù dudius-tre, dreist-holl avat diwar-benn politikerezh, armerzh pe ar broioù keltiek. Ne welan ket avat peseurt talvoudegezh, en tu all d'an '**diduiñ**' (?) a c'hell kavout al lennerion gant bannoù treset hudur 'zo, pe c'hoazh gant pennadoù diwar-benn sonerezh rock etrevroadel, n'o deus netra da ober en ur gelaouenn '**emsavel**' ha kinniget d'an nevez-vrezhonegerion yaouank. **Marteze** avat n'eo ket '**AL LANV**' ur gelaouenn **emsavel** ? Eno emañ an dalc'h. En em c'houlenn a ran da betra 'ta e servij mirout ouzh ur yezh a vont da get, maz eo evit bevañ evel Gallaoued pe Amerikaned brezhonegerion. N'eus ster ebet d'an dra-se. Kavout a ra din e tle hor yezh bezañ benveg un ober **emsavel**, dres, un doare dispac'h, mar karit, e-ser degas d'ar bed un nevezadur eus ar gevredigezh: ur **benveg-enklask dizalc'h**, hag ur **benveg-krouiñ kevredigezh**, unan disheñvel avat, eveljust, diouzh an hini a anavezomp.

EEEEEEEEEEEEEEEE

#### BREMAÑ

Kelaouenn ar stourmoù e Breizh. Setu aze ur gazetenn talvoudus da lenn. Dezrevell a ra darvoudoù ar miz evit pezh a sell ouzh stourm an emsav e Breizh. Bez' ez eus ivez ur sell war ar pezh a dremen en diavaez: Euskadi, Okitania, Korsika, hag all... Levrioù **Bremañ**, korn ar "**petra din-me**" evit ar gerioù nevez, pennadoù skianteloc'h a zo mat evit diorren ar yezh ar dachennoù 'zo, hag ivez evit ober anaoudegezh gant kudennoù liesseurt an armerzh, an drevoniezh hag an amvevadouriezh, h.a. Kalz pennadoù **diduiñ** a zo ivez, na petra 'ta, evel e-barzh **Al lanv**... Re nebeut diwar-benn politikerezh avat: n'eo ket '**politikerezh politikel**' a fell din lavarout amañ, met hepken ur buruteladur eus ar gevredigezh diouzh savboent ur brezhoneger a-vremañ. Ur seurt burutelladur a gaver hogos hepken gant '**Notennoù Politikel**' IMBOURC'H, siwazh! Poent e ve-

fe soñjal reiñ lañs amañ e Breizh d'ur preder politikel brezhon gwirion, hag ivez kelenn ar preder-se d'an dud a zeu e-barzh an emsav. Ur gudenn a stummadur a zo e-barzh an emsav. Spi am eus e vo kavet un diskoulm d'an ezhomm-se gant renerion SAE ha Bremañ. A-hend-all em eus lennet gant plijadur en niverenn 39, miz Kerzu 1984, pennad Y..F. Jacq a zo e dalbenn 'Feiz ha brezhoneg', diwar-benn Minic'hi Treflevenez.

Evit kaout BREMAÑ, skrivañ da : SAE, 8 straed Hoch, 35 000 Roazhon.

~~~~~

AN HAD

Kelaouenn diavaez DIWAN. Ne zeu ket alies ar gelaouenn-se er-maez; unan bep bloaz, pe war-dro. Niverenn miz Here 1984, niverenn 7, a verk eta seizhvet bloavezh ar gevredigezh. E galleg eo skrivet hogos penn-da-benn, o vezañ maz eo ul lodenn vat eus izili DIWAN diouizieq war ar brezhoneg, siwazh. Notennomp memestra ez eus muioc'h a vrezhoneg e-barzh ar c'han-nadig diabarzh. A-Hend-all e vez embannet ar gazetenn viziek CHOLORI, e brezhoneg penn-da-benn, kazetenn evit ar vugale. Souezhus eo ne rafe ket Cholori muioc'h a verzh eget e hendad 'Wanig ha Wenig', daoust dezhañ bezañ kinniget kalz bravoc'h. Ret eo koumanantiñ eta evit skoazellañ ar skipailh kalonek-se, rak ur gwir glaoustre eo ar gazetenn-se evel DIWAN dre vras, forzh penaos. Ur gwir burzhud eo ma chom war-sav c'hoazh hiziv. Soñjit 'ta: tost daou-ugent den o labourat bemdez-Doue e brezhoneg hag evit ar brezhoneg, ouzhpenn tri-c'hant bugel o taremprediñ ar skol-se betek ar CMI, kement-all a dud o labourat ingal evit DIWAN, - n'eo ket hepken evit kavout arc'hant, - rak diouer bras a zo, evel ma ouzoc'h, met ivez evit reiñ buhez d'hor c'hevredigezh a vrezhonegerion, en ur aozañ gouelioù, tombolaioù, emvodoù-kelaouiñ, manifestadegoù, predoù,

stajoù en Oaled Diwan, gwerzhadegoù gwin, wiski, dilh-adoù, ha me 'oar-me ! Klask a reont ivez bastañ da ezh-ommoù pedagogel ar vugale dre ul labour treiñ levrioù jedoniezh, da skouer, met ivez dre grouiñ oberennoù lennegel nevez evito. Ur gwir 'gas-war-raok' a zo gant DIWAN; deomp eo kemer perzh en e obererezh. Kudennoù a sav eveljust etre izili ar gevredigezh, kudenn an 'divyezhegezh', da skouer... War an hent mat emañ DIWAN avat; salv ma kendalc'ho gant an erv ha ma kresko, gant skoazell pep hini ac'hanomp.

~~~~~

AL LIAMM

Daoust ma kavan a-wechoù divlaz a-walc'h al lennegezh vrezhonek - pe c'hallek - pa ne vez ket mennoziou e-barzh ar skridoù, e rankan anzav en deus AL LIAMM dedennet muioc'h a dud, en ur zibab an dachenn-se, eget forzh peseurt embannadur all e brezhoneg, hiziv an deiz. Gwir eo ez eus, ouzhpenn al lodenn lennegel, an Notennoù brudet, a zo bepred ken dudius da lenn. P.J.H. Kemper a gemenn deomp, da skouer, ne ra forzh ebet gant an doare-skrivañ : gwell a se ! Ur c'hleñved spegus eo hennezh met pareañ a reer tamm-ha-tamm, ha gwell a se ur wech ouzhpenn. Gortoz a ran lizhiri re all, p'o devo komprenet ez eo interest ar yezh kaout un doare-skrivañ hepken. Re nebeut a dud ez omp evit en em ran-nañ war zigarez kozh traoù a zo c'hoarvezet, sañset, e-pad ar brezel. Brezhonegerion eus an holl zoareoù-skrivañ, en em unanit !

A-hend-all, lennet hoc'h eus evel don, moarvat, pennad Mikael Treger e-pad an hañv tremenet, anvet "Bleuniou Disglavierou"; ma n'hoc'h eus ket graet, ez alian start ac'hanoc'h d'e lenn. Tuchañtik e skriven ne oa ket kalz a breder politikel gant an emsaverion; aze avat hon eus ur pennad a-bouez, d'am soñj, hag a c'hellfe talvezout da skouer evit prederiañ war hon dazont (lennit

Kendalc'h war ar bajenn 352

E-barzh studiadenn Jil Ewan diwar-benn an Azblivaerezh radwerc'hek ez eus un damveneg eus emziskouezioù Medjugorje e Kroatia, a c'hoarvez abaoe ouzhpenn tri bloaz. Amañ da heul e vo kavet un tamm renta-kont eus an darvoud-se, aozet gant ul leanez eus Abati Ar Gelvezeg, e-tal Laval.

### Daoust hag ar Werc'hez Vari en em ziskouez e Medjugorje ?

gant

Ivona Gag


Nevez zo en deus an abad Laurentin embannet ul levr a zo e dalbenn "Daoust hag ar Werc'hez Vari en em ziskouez e Medjugorje?" a zo, evit darn, aozet diwar ul levr all skridaozet e Kroatia - peogwir e c'hoarvez an darvoud-se e Kroatia, dindan renad komunour Beograd. E penn-kentañ al levrenn e kaver ur blenlavar savet gant an abad Laurentin e-unan; ennañ e lavar ar beleg en deus ranket lezel agostez munudoù zo evit chom hep droukveskañ hiniennoù a zo meneget en e skrid, na displijout da bennadurezhioù ar renad a zo e penn ar Stad yougoslavat.

War-lerc'h an danevell aozet diwar ar c'hroatia e kaver ivez ur burutelladur eus ar fedoù dezrevellet en danevell, gant an abad Laurentin e-unan adarre; klask a ra hemañ pouezañ an elfennoù a zo a-du gant dilested ar fedoù meneget, hag ar re a vefe, er c'hontrol, a-enep.

Roomp bremañ un nebeut titouroù diwar-benn an darvoudoù-se.

#### Peseurt lec'h ?

Bez' ez eo Medjugorje ur gêriadenn vihan eus rannvro Herzegovina, e Kroatia. C'hoarvezet eo an emziskouezioù





Ivan o tistoreñ eus ar parker, 3 a viz Du 1984

war ar maez da gentañ, war un dorgenn krin ha meinek, tostik d'ar gêriadenn hazo valirañ a-ziouti. Ar re yaouank o doa krapet betek lein an dorgenn, d'ar red, d'illo da sabatuñ, hag int diarc'henn koulskoude, e-giz pa vijent bet dedennet gant ar welidigezh, hep santout pegen garv e oa an hent. Unan eus ar merc'hed avat a oa manet semplet. Antronoz, d'an hevelep eur, hep bezañ bet amzer d'en em renkañ kenetrezo, o doa en em gavet e-tal an hini a oa o c'hortoz anezho. Lavaret o doa c'hwec'h **Hon Tad a zo en neñv**, c'hwec'h **Me ho salud, Mari**, ha c'hwec'h **Klod d'an Tad...**, en ur ouzhpennañ ar c'h**Credo**\* Diwar neuze ez eo ar bedenn-se a vez lavaret bepred gant ar welourion hag ar re en em gav war o zro.

A-c'houdevezh, o vezañ m'emañ difennet gant ar penna-durezhioù komunour derc'hel emvodoù relijiel er-maez eus an iliz, en em ziskouez ar Werc'hez en un adsal eus sakristiri an iliz-parrez, -dalc'het gant Frañsiskaned, notomp mat, pezh en deus lakaet kudennoù da sevel, dre maz eo leviadurezh an eskob er rannvro-se erlec'hiañ ouzh al lea-  
ned-se beleion eus an eskopti, - lec'h enni hepken evit ar pemp gwelour a chom -unan anezho, Mirjana, ne wel ken, ha pedet eo bet gant ar Werc'hez da adkregiñ gant buhez voutin ar gristenion - hag un hanter dousennad bennak a dud ouzhpenn.

Adal an deizioù kentañ eo e oa bet lakaet ar pennadurezhioù war evezh, ha, na petra, dec'haloupet e oant kerkent evit lakaat berz war ur seurt manifestadeg a dorre al lezenn a-grenn peogwir, - e-giz m'hon eus merket, - ez eo en iliz hepken ez eus gwir da zerc'hel emvodoù relijiel. Harzet e oa bet ar welourion ha kaset d'ur bredvezeg da vezañ arsellet; hemañ avat n'en doa diverzet brednamm ebet en o emzoug, ha laosket e oant bet da vont. Diwar-henn eo avat e oa bet dalc'het an emvodoù gant ar Werc'hez e diabarzh an iliz.

**Peseurt amzeriadoù a zo d'ar gweledigezhioù ?**

Bemdez eo c'hoarvezet an emziskouezioù, nemet pemp gwech, ha kement-se abaoe ar 24 a viz Mezheven 1981. Ar milvet emziskouezadenn a zlee c'hoarvezout war-dro ar

25 a viz Meurzh 1984 (1). Ar wech kentañ eo e klever anv eus ken stank emziskouezioù. En Iwerzhon, e Cnoc Mhuire, ne oa c'hoarvezet nemet ur wech; gwir eo ivez he doa padet houmañ meur a eurvezh. An emziskouezadennoù-mañ ne badont mui nemet un nebeut munutennoù bep taol.

#### **Piv eo ar welourion ?**

C'hwec'h a zo anezho, bugale ha tud yaouank, etre unnek hag ugent vloaz, daou baotr ha peder plac'h, disheñvel-tre dre o orin, o zro-spered, o deskadurezh, (unan anezho a studi ar c'hounezouriezh en ur Skol-veur), o renkad. E-touez ar re-se hini pe hini a zo e soñj en em ouestlañ d'ar vuhez relijiel; o c'halonekaat a ra ar Werc'hez da gas da benn o mennad, en ur lavarout dezho, padal : "Deoc'h -c'hwi eo divizout hoc'h-unan." Unan eus an dud yaouank a gav gwelloc'h dimeziñ. En em santout a reont dieub enta. O c'hortoz ez eo bet tregemmet a-grenn o buhez gant an darvoudoù. Pedit a reont teir eur bemdez, yuniñ a reont, div wech bep sizhun, diwar bara ha dour, evel maz eo bet erbedet dezho gant ar Werc'hez; ha karget int a levenez.

Setu amañ anvioù ar welourion : Jakov, an hini yaouankañ, 11 vloaz, Yvan, Vicka, Maria, Ivanka, seitek vloaz ; ret eo ouzhpennañ Mirjana, an hini goshañ, nemet houmañ ne wel ken.

#### **Nag ar Werc'hez ?**

Bez e lavar an emziskouezadenn bezañ ar Werc'hez Vari, **Rouanez ar Peoc'h**, he deus resizet d'ar 6 a viz Eost 1981. En em ziskouez a ra gwisket gant ur sae louet hag ur ouel gwenn-kann. D'an devezhioù gouel avat e vez gwisket gant dilhad alaouret. Komz a ra e kroateg, didro ha diardoù, er yezh lennek avat; ul lec'h a gemer en egor peogwir e c'heller stekiñ outi; kalet evel dir eo avat ar stumm a ziskouez d'ar welourion. Asantiñ a ra da selaou ar c'hefridioù a vez treuzkaset dezhi gant ar welourion a-berzh hini pe hini eus ar birc'hirined.

#### **Peseurt kemennadurezh a zo ganti ?**

Houmañ a zo an hini a vez degaset gant ar Werc'hez ingal en hec'h emziskouezadennoù. Ret eo pedit, ober pinijenn, yuniñ, en em ganttreiñ ouzh Doue, kemm buhez. "Bez' e c'hell ar bedenn hag ar yun herzel ouzh ar brezel a zont! Bez' e vir ar welourion ur yun strizh, diwar bara ha dour, erbedet gant ar Werc'hez, evel m'hon eus merket, div pe deir gwech bep sizhun. "Kastizet e vo ar bed avat ma ne vez ket kanttroet."

#### **Peseurt "segredoù" a zo ?**

Evel e Fatima ez eus bet fiziet "segredoù" er welourion. En holl ez eus bet dek anezho, hogen n'int ket bet klevet razh gant an holl. Mirjana a zo an hini nemeti oc'h anavezout an holl; ar re all n'anavezont nemet seizh, eizh pe nav...

#### **Peseurt frouezh a zo ?**

Diouzh he frouezh e varner ar wezenn. Treuzfurmet, kanttroet eo bet ar barrez penn-da-benn. Pedit a ra ar gristenion er barrez-se teir eurvezh bemdez ; yuniñ a ra kalzig anezho ; en em adunvaniñ a ra ar re a oa enebourion a-raok an emziskouezioù; stank-tre eo niver an dud a vez o komuniañ bemdez ha da sul. Ren a ra ar peoc'h e pep lec'h.

#### **Peseurt disoc'h a vo d'an emziskouezioù ?**

War a seblant e tlefe bezañ fin d'an emziskouezioù hep dale. War verraat ez a o fadelezh hag houman ned a ken en tu-hont d'un nebeut munutennoù. Lavaret he dije ar Werc'hez ivez e vefe hec'h emziskouezioù e Medjugorje he re ziwezhañ war an douar. Komz a ra ivez eus kastiz an denelezh. Kemennete vint d'ar welourion gant ur sin bennak un nebeut devezhioù en a-raok. Ur sin all a vo ivez hag a c'hell bezañ merzet gant an holl. Ar sin-se a lezo ur roud dalc'hus war e lec'h.

#### **Gweladenn an abad Laurentin**

Aet eo an abad Laurentin da vMedjugorje d'ar 24-25 ha 26 a viz Kerzu 1983. En em gavet eo en emziskouezioù a zo c'hoarvezet e-pad an tri devezh-se (peogwir int

pemdeziek). Reiñ a ra e **verzadoù** da c'houzout en e levr met ivez en ur pennad a zo deuet er-maez war **La France catholique** eus ar 17<sup>vet</sup> a viz C'hwevrer 1984, kendalc'het war niverenn ar 24 eus an hevelep miz. Setu ar pezh a skriv:

"Evel un istorour eo em boa studiet betek-henn ar goursavioù, ha me o varn diwar dielloù, pa veze anv eus Catherine Labouré, Bernadette, gwelourion Pont-Maen. E-pad pell n'em boa anavezet gwelour bev ebet. Ha m'am eus kejet, a-c'houdevezh, gant re vBeauraing(2), ha re all, e oa bepred war-lerc'h o gwelidigezhioù. Medjugorje enta en deus roet an dro gentañ din da welout, - n'eo ket un emziskouezadenn, hogen ur goursav. Hag ar ver zadenn dihanterat-se a responte da veur a c'houlenn am beze graet din hep kavout gwech ebet ar respont.

Diwallomp avat ! N'eo ket echu an emziskouezioù, hag an Iliz n'he deus ket barnet c'hoazh. Gwisket em boa enta an hobregon a zisfiziañs a vez rekiz e seurt degouezh.

Padal ne voe ket kadarnaet gant netra va goulakadurioù-burutellañ...


Un iskis a arnodad ez eo evit un istorour ac'hezañ ouzh ar gwirvoud bev. Ned eo an dielloù nemet ludu ar vuhez. En dro-mañ avat e oan dispontet, skoueriet mat, ha kalz am eus desket... Gant an dibenn dreist-holl avat on bet fromet. O c'hortoz edon o dije ar welourion, forc'het diouzh ken berr eurvad, erzerc'het doan pe hiraezh. Hama, n'eo ket c'hoarvezet an dra-se: seder ha nerzh e chom dremmoù ar welourion, en o c'herc'henn tamm liv ebet eus ar c'hoant kerseet, kentoc'h avat, hini ar c'hoant bet roet dezhañ he gwalc'h penn-da-benn. Prest int da bep tra : da bediñ e teñvalijenn ar feiz, da yuniñ, evel ma reont a galon laouen div wech bep sizhun; da zougen riskloù ha sammoù o gras, ur c'hvas ha na zistruj ket o natur, hogen a gefleugn anezhi. Pep tra a zever amañ war-eeun eus an enkorfadur hag ar C'horf kevrinel."

Karout a rafen-me ouzhpennañ ez eo bet embannet an oberenn-mañ eus an abad Laurentin war-lerc'h un teskad




Vicka, unan eus ar gwelourezed





Hervez levr an abad Laurentin



a skridoù kozh ha nevez diwar-benn ar Werc'hez Vari aoz-et gantañ, hag a zo bet nevez embannet pe a zeuio er-maez a-barzh pell.

Savet eo bet al levr-mañ evit respont da vennad Yann-Baol II da c'hourbonnañ ez eus a sant Grignon-a-Venezkreñv un **Doktor an Iliz**.

Hor Pab a hiziv, hag eñ devot-bras d'ar Werc'hez, evel ma oar pep hini, en deus en em ouestlet dezhi hervez dec'heriadenn Grignon-a-Venezkreñv. Ha diwar-henn ez eo pignet ar sant-mañ eus an tregontvet renk d'an trede hini war roll an danvez **doktored-an-Iliz**; ar c'hourbonnadenn-se a c'hellfe bezañ graet er bloavezhioù a zo o tont.

Levr diwezhañ an abad Laurentin a zo o prientiñ ar spe-reodoù d'ar c'hourbonnadenn-se.

Gant kalz a zudi em eus lennet an tri levr-se ha va c'hennerzhet bras o deus da vezañ devot d'ar Werc'hez. En ur erbediñ anezho da lenn d'ho koumananterion e hetan e c'hoarvezfe kement-all ganto.

Ivona Gag

Leanez

\*\*\*\*\*

NOTENNOU

- Ret eo distagañ : Mediougorye. Tost d'ar gêriadenn-se, ma ne faziomp ket, e oa bet sevenet ul lazhadeg bennak e-pad ar brezel diwezhañ. Distrujet e oa bet pemp pe c'hwec'h mil soudard digomunour gant arme Tito. Kement-se, ma ne faziomp ket bepred, a oa c'hoarvezet da heul un emglev etre ar Saozon ha Tito end-eeun. Kavet o doa ar Saozon askorusoc'h en em glevout gant hemañ eget kenderc'hel da harpañ ar soudarded a nac'he degemer ar gomunouriezh.

\* Gant ar Werc'hez e oa bet goulennet distagañ ar c'hCredo.

[1] Ar pennad-mañ a zo bet kaset deomp bloaz zo. N'hon eus ket bet keloù abaoe nemet hon eus klevet er mizioù diwezhañ e pade bepred an darvoudoù. Dre ar c'hazetennoù avat hon eus gouezet ivez e kendalc'he eskob al lec'h da nac'hañ pep dilested ouzh an emziskouezioù, marteze diwar e enebiezh ouzh al leaned a zo karget eus ar barrrez-se dalc'hmat. Notomp ouzhpenn ez eus bet embannet nevez zo, e dibenn ar bloaz, gant an abad Laurentin, ur seurt stagadenn d'e levr deuet er-maez e deroù 1984, e-lec'h e tiogel, peurgent, e-touez traoù all, e kred-eñ bepred e dilested an emziskouezioù.

[2] Beauraing, e Wallonia, etre an daou vrezel. Tabut a oa savet ivez e ser an emziskouezioù-se. Soñj am eus bezañ klevet komz anezho p'edon o vevañ e Cambrai a-raok ar brezel, ha me ur bugel ac'hanon d'ar mare-se.

Y.O.

XXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXX

Trugarekaat a reomp hor c'henskriverez evit an titouroù he deus prizet reiñ deomp diwar-benn an darvoudoù dreistordinal-mañ. Klask a raimp ur wech bennak, p'hor bo tro, ober un tamm addispleg dezho ha klask plaenaat ar ster a c'hell kaout hevelep diouganerezh marzhek ha radwerc'hek war un dro.

Levr an abad Laurentin a zo bet embannet gant an ti O.E.I.L. e Pariz.

Moulet gant ar gelaouenn

Ar rener : Y. Ollivier

CPAPP: 50 015

